

GEORGES GOURDON

Jeann d'Arc

TRI ARVEST E SEIZ TAOLEN


TROET EUZ AR GALLEK



BREST
MOULLEREZ RU AR C'HASTEL, 4
—
1910

Académie de la langue

55 D



JEANN D'ARC

10704

GEORGES GOURDON

63

812

682

Gov

Jeann d'Arc

TRI ARVEST E SEIZ TAOLEN

TROET EUZ AR GALLEK

BREST

MOULLEREZ RU AR C'HASTEL, 4

1910



JEANN D'ARC

Tri Arvest rimet e seiz Taolen.

PERSONACHOU

NIHIL OBSTAT :

Die 10 Februarii 1910.

J. UGUEN, *Censor.*

IMPRIMATUR :

Die 11 Februarii 1910.

A. COGNEAU,
Vic. gén.

JEANN D'ARC.

CHARLES VII, roue Frans.

AN AO. DUK A VEDFORD, contr roue Bro-Zaoz.

AN AO. DUK DE LA TRÉMOUILL, mignoun Charles VII.

AN DUK A VOURGOGN.

AN DUK A ALENÇON.

DUNOIS, bastard Orleans.

IAN A LUXEMBOURG, komt Ligny.

Eur map da IAN LIGNY.

RAOUL DE GAUCOURT, gouarnier Orleans.

ALAN CHARTIER, barz ha sekretour Charles VII.

DENIS AN DERO, arc'hantaer ar Roue.

LAHIR,

XAINTRAILL, } marc'heien.

VILLARS,

IAN A VETZ, floc'h an ao. Beaudricourt, e Vaucouleurs.

IAN D'AULON, floc'h Jeann d'Arc.

JAKEZ D'ARC, he zad.

PER D'ARC, he breur.

DURANT LAXART, he c'henderv.

IAN D'ESTIVET,

KOMT BEAUVAIS, } barnerien.

BEAUPER,

NICOLAS LOYSELEUR.

FRER MARTIN LADVENU, a urz S. Dominik, kofesour Jeann.

IAN VASSIEU, urcher.

IAN BOITEVIN, pesketaer en Orleans.

TALBOT,

SUFFOLK,

SCALES,

GLASDALL,

} jeneraled Saoz.

PONYNGS, offiser saoz.

JOHN GRIS,

JOHN BERWOIT,

WUILLAM TALBOT,

} soudarded saoz, o tioual Jeann
e prizoun.

AOTROUNEZ, SOUDARDED, MICHEROURIEN, etc.

KENTA ARVEST

Taolen I. — EN HENT ! — Taolen II. — DIRAG AR ROUE

(Trizek c'hoarier a c'hell diskleria komzou an 33 personaj)

— L'original français a trois rôles de femmes : Isabellé Romée, Mengette et Jeanne de Béthune, que le texte breton remplace par Pierre d'Arc et un fils de Jean de Ligny.

— Le rôle français de Pierre Cauchon est partagé, dans le breton, entre le comte de Beauvais et Beaupère.

— Enfin, quelques paroles de Jeanne (30 mai 1431) ont été ajoutées dans le texte breton. Pour le reste, la traduction est littérale.



JEANN D'ARC

ARVEST KENTA

TAOLEN I

(En hent...)

E miz Genver 1429, goude kreizdeiz,
E Domremy, ebarz ti Jeann d'Arc.
A gleiz, prenestr, — oaled huel. — dor var eur gambr all.
E kreiz, eun or all.

DIVIZ I

JAKEZ D'ARC, IAN A VETZ

JAKEZ D'ARC

Kendaze ta, ez a goasoc'h goasa an traou ;
Foranet ar bern ed, e klasker ar pennou :
E noaz e rankimp mont, pa 'z omp hanv-goanv, bepred,
Debret gant tud Bourgogn, ha gant ar Saoz laeret.
E tiez tud didrouz ha n'euz den d'ho difenn,
E teu ar soudarded — tok houarn var ho fenn,



JEANN D'ARC

ARVEST KENTA

TAOLEN I

(En hent...)

E miz Genver 1429, goude kreizdeiz,
E Domremy, ebarz ti Jeann d'Arc.
A gleiz, prenestr, — oaled huel, — dor var eur gambr all.
E kreiz, eun or all.

DIVIZ I

JAKEZ D'ARC, IAN A VETZ

JAKEZ D'ARC

Kendaze ta, ez a goasoc'h goasa an traou ;
Foranet ar bern ed, e klasker ar pennou :
E noaz e rankimp mont, pa 'z omp hanv-goanv, bepred,
Debret gant tud Bourgogn, ha gant ar Saoz laeret.
E tiez tud didrouz ha n'euz den d'ho difenn,
E teu ar soudarded — tok houarn var ho fenn,

Stern houarn var ho zro, lans gantho, — rust ho ger,
 Ha pa dizont eun dra, dezho eo, dibreder !
 Dirag ar bleizi-ze, beteg Kastelnevez
 Varlene ni rankaz tec'het, hon tiez kez
 O tivogedi c'hoaz en tan-goal var hon lerc'h,
 Ha n'heljomp kas ganeomp na greun na foen na kerc'h !..
 Dek vloaz zo ma c'hoari ker fall — dek vloaz pe dost —
 Ganeomp Pipi Gouer, ni paotred an eost,
 Deomp eun ti soul epken hag eun tammik douar !
 Ia, abaoe m'e deuz ar rouanez (c'hui oar
 Pelec'h) en em glevet gant Philip an duk treiz
 Vit trompla hor Roue, he fried sod, ho freiz,
 Ha sinet an emgleo mezuz, trubard ha iud
 'Ro he merc'h d'ar prins saoz... hag hor Bro Franz d'he dud,
 An divroad brema a zismant al Lorreen,
 Ar Champagn, hag a vir ouz hor roue da ren.
 En aner hon duk-ni, o klask en em zouten
 A harz krenva ma c'hell, ha gant ho kapiten
 Da ziousal he zouar a zav fors soudardet :
 Ato ni rank gortoz an Hini ne deu ket...
 Eur mestr, dichek he c'her ha gallouduz he vreac'h,
 Ken brudet ma jacho ar bobl oll var he lerc'h
 Evel eun eil Guesclin laouen e kreiz an tan
 Da vunta pell ar Zaoz vel ma vunter chas klanv !

IAN A VETZ

Bezit kaloun ! E Vaucouleur hor c'hapiten
 Baudricourt a c'hello pell aoualc'h delc'her penn

Ouz Anton a Vergy, letanant duk Bedford,
 Ken stard ha ken dispount hag eur garrek er mor
 Mes mall braz eo kompren ha poania a zevri ;
 Hon diveza stourm eo : sklavourien, pe vistri !
 Oll a-unan, var zao, en dro da Jarlez Seiz !

JAKEZ D'ARC

Evit difen he wir, Doue oar, noz ha deiz,
 Dizamant d'al labour, ne baoueziz morse :
 Va mipten ha va merc'h, ken entanet ha me,
 Oll aman e karomp hor mam-bro a galoun !
 Ha vit he zavetei, ma vije red, prest oun
 D'implija evit Frans va zammik danvez oll.
 Mes perag stourm ? piou a viro na zeñ da goll ?
 Didalvez al louzou, pa ronkell an den klanv !

IAN A VETZ

Dalc'hit ! ne bado ken, siouaz, ar vrezel-man !
 Beaumont ha Passavant kollet, abarz nemeur
 Ma ne ro den skoazel, e kollimp Vaucouleur ;
 Kear Orleans hor galv truezuz d'he sikour ;
 Hor roue na c'hell kas na soudarded nag aour ;
 Ha peguir re a dud, eleac'h stourm, a dro kein,
 Hor bro geaz a blego da lezen ar Saoz brein !

JAKEZ D'ARC

Vaucouleur o plega da lezen al laeroun !
 Domremy — o malloz ! — beza preiz ar Zaozoun !

DIVIZ II

*Ar memes re, JEANN D'ARC, gant dillad ruz, en em gavet
p'edo he zad o paouez komz.*

JEANN

Prins reuzeudik ! mes kalz reuzeudikoc'h Bro-Frans !
Ma n'e zireder ket da zikour Orleans,
Hon esper diveza gant he mur a guez
Ha varc'hoaz tra ebet ouz ar Zaoz ne harzo !
D'ar Zaoz e roomp nerz oc'h em zraill etrezomp ;
Da vont e kreiz ar vro an hent a zigoromp,
Ha moarvad Frans abez vo d'ar Zaoz dizale !...
O pet truez outhi, hon hentchit, va Doue !

(D'he zad, gant err).

En han' Doue, va zad, vit ho silvidigez,
Roit madou hag all, dinec'h, gant largentez :
Rag sonet eo an heur ma tleomp beza trec'h.

JAKEZ D'ARC

Bez habaskoc'h, va merc'h ! Ha d'az tro bez dinec'h :
Ne fallgalounin ket. — Ho tigarez, aotrou ;
Furoc'h e vo kuzat outhi hon lavarou,
Rag he fenn a labour, ha birvi ra he goad.
Deuit ganen, mar plij, er gambr all eur pennad.

(An daou kuit).

DIVIZ III

JEANN D'ARC, ha PER D'ARC da c'houde

JEANN, outhi he-unan

Daved ar prins iaouank ez in, pe 'z eo kollet.
An heur a zon ! Me glev dalc'hmad va Sentezed,
Ne badan ken, n'oun ket vit erzel outho ken...
Ia, mes penaoz kuzat ouz va zad en anken ?
Ma tizolo va zaol ?... Mes nan, nan, diganeoc'h
Va Doue, e teu d'in ha va zonj ha va feoc'h !

PER

Petra teuz ? Na pegen strafillet oud ta, Jeann !

JEANN, buan

Perik, va zelaou mad. Mont a ran kuit ac'hann ;
Lezel va mamm !.. Red eo : Doue am galv. Te oar
— Te, kaloun feal meurbed, ato dous vit da c'hoar —
Petra ziskler va Moueziou d'in aboe tri bloaz.
Me meuz lenvet, harzet... en aner. Ha siouaz
En dro-ma n'hellan ket chom e plas na debri :
Bolontez Doue eo, n'euz ket da arvari.
Daved ar prins iaouank d'ar C'horaiz e vezin,
Pa rankfe va diou c'har uza bet' an daoulin.

PER

Me zo berr a spered, paotrik divar ar meaz,
 N'oun dare da be fin da Voueziou da c'halvaz !
 Mes da galoun, da feiz, me oar mad ho anaout :
 Rag ne glaski morse trompla, me gred ennout.
 Mes penaoz trei ive spered hor mam, hon tad ?
 Ma klevont, e virint ouzid ho daou dalc'hmad ;
 Ha n'helli ket kuzat ez ez kuit, va Jeannett ?

JEANN

Piou oar ? Da va c'henderv Laxart e meuz kaset
 Kelou da zont amañ d'am c'herc'hat en he di
 Var zigarez e fell d'he c'hreg va c'haout ganthi.
 Ac'hano e tennimp hon daou da Vaucouleur.

PER, *krenv*

Penaoz ! Te gredfe mont ? Mes ne zonjez nemeur
 En daelou a skuillez, en dro genta, bloaz zo,
 Pa reaz Baudricourt d'id he zigemer garo ?

JEANN

Brema ne vezo ket ken digempen he c'her ;
 En dro all en dije great bravoc'h digemer
 M'en devije gouezet e pe woask e rinklomp.

PER, *o sellet dre ar prenestr*

Mes Laxart zo erru. Eur vech c'hoaz 'n em bokomp,
 Jeann. Kenavo ! Doue d'az henchâ, d'az tious !

JEANN

Bez da Zoue ato. Pa vezin e Bro-C'hall
 Var varc'h, gant soudarded, o vont da gear Chinon
 Per, konsol hor mam geaz, komz outhi evel don !...

(En em vriata reont. Per kuit o vouela).

DIVIZ IV

JEANN

Ha guir eo ta ! Va mam, hirio, a zilezin ?
 Ha drê guz ac'halen evit ato ez in ?
 Me, mont kuit ! Me, lezel va zud nec'het feno !
 Pa glevint oun tec'het, m'em bezo ho malloz !
 Ah ! va c'halon a fraill... Brema, dare d'ho c'holl,
 Me vel penaoz ' karien tad, mam, anezho oll !
 Va bro muia karet, m'oun bet ganet ennh
 Trivac'h vloaz zo... mont kuit, o pebez melkoni !
 Va buez a rede guerc'h, didrouz ha seder
 Evel dour glaz ar Meuz dre vleun hor parkeier.
 O traonien dudiuz ! o paour keaz keraden !
 Da viken eo livet em lagad ho skeuden ;
 Kimiada rank ho merc'h diouzoc'h evit ato.
 Va iliz koz, ken dous d'am feden, kenavo !
 Va liorz gant lili guen-kan, ha guenan aour,
 E leac'h ma c'hourniye va Moueziou d'am rekour !
 Kenavo, ti va zad, tiegez benniget :
 En da greiz e lezin va c'haloun harluet !

Mez nan ! Izoum braz zo euz va c'haloun abez
 Evit beza krenv, da Zoue guir kannadez,
 Vit peur-gas va labour ken laouen, ken spountuz !
 — Va Doue, ha n'oun ket, me Jeannett, orgouilluz ?
 Ne ouzon ket pignat var varc'h, brezellekât,
 Hag e kichen va mamm, guel ve ganen griat,
 Ober stam pe neza pe dioual va denved,
 Eleac'h kaout eur c'hleze, eun harnez, soudarded !..

MOUEZIOU *er meaz*

N'euz den var an douar da zavetei ar vro
 Nemedoud, merc'h Doue ! Kerz, kea d'ar Frans, red eo.

JEANN, *o kuez a d'an daoulin.*

Pa n'euz 'medon evit savetei hor bro-ni,
 Prest oun ! Ho polontez vo great, nan va hini.

DIVIZ V

JEANN D'ARC *ha* DURAND LAXART, *en em gavet var
 dreuzon an or abaoue eun tachadik.*

JEANN, *o, tiredet dezhan*

Bennoz deoc'h da veza deuet, kenderv Durand.
 C'hui lavaro e fell d'ho kreg...

LAXART

Gouzout a ran

Perag c'heuz va galvet. Evel er genta tro
 Prest oun — va dever eo — d'az hentcha dre ar vro :
 Da Vaucouleur, hon daou, ez aïmp eur vech c'hoaz.
 Padal, va lez da lavaret e kavan braz
 Kas ac'hanoud d'hennez, d'he gomsou rusk ha rok,
 Ma tle-hen adarre hor c'has d'ar gear, mezok.

JEANN, *gant nerz*

En dro-ma, Baudricourt a ranko va selaou,
 Rag nag hen nag hini na harz ouz va Aotrou ;
 Ha pa rankjen bale var bennou va daoulin,
 Araok miz, eharz t'reid ar Roue e stouin !

LAXART

En hent ! Ma fazian, Jeannett, oc'h da gredi,
 Pa vel strad va c'haloun, Doue d'am fardouni !

DIVIZ VI

Ar memez re, IAN A VETZ, JAKEZ D'ARC hag he vipien
 JAKIK, PER ha IAN

JAKEZ, *da Laxart*

Sell, va niz ! A beleac'h an eurvad d'az kuele
 En deiz-ma ?

LAXART

Dont a ran, eontr, dre ma 'z eo kollët
 Va greg-me gant ar c'hoant da gaout Jeann var he zro.

JAKEZ, *a gostez, da Laxart*

Brao dreist ! Edomp lakeat ganthi nec'het maro :
Guech e sonj mont da stourm, guech evel hanter-fur...
Chom ganeoc'h vo dezhi repoz ha plijadur.

(o tiskuez an daol kempennet gant Jeann)

Koania rit ganeomp ?

LAXART

Nan ; an noz a guez buan ;
Burey zo tost aoualc'h, guelloc'h eo mont breman
Ha zoken skei berroc'h dre an henchou a dreuz,
Ma plij gant Jeann : lavar.

JEANN

Vit aoun, morse na meuz !
Prest oun, deomp en hent ! Va zud, n'o pet ket nec'h.

JAKEZ, *o teuler eur vantel varnhi.*

En han' Doue, kerz ta... mes dioual mad, va merc'h !

*(Jeann a bok d'he zud ha d'he breudeur, ha divar
an dreujou e tro adarre varzu enno, o kas dezho
eur pok hag eur zell diveza).*

JAKEZ, *d'he vipien.*

Va c'hredit, bugale, beillit var ho c'hoar paour :
Eur galoun entanet a guz en eur gouin flour...

*chi
fourreau*

Em uvreou m'he guel, stern houarn var he zro,
E touez soudarded, var varc'h, o vale bro...
Ma c'houfen ez aje er c'hiz-ze deuz ar gear,
Me c'houlenfe diouzoc'h he beuzi ep arvar.
Ha ma n'her beuzfac'h ket, me he zad, m'her grafe.

PER

O ! arabad, va zad ! Blasfemi rit aze.
Piou ne oar ket aman he joa ouz ar beorien,
He c'haloun aour, he dourn ken dous d'ar glanvourien ?
Daoust ha n'eo ket ouzoc'h sentuz hag eveziant ?
Ato prim da zavel, laouen oll, ato drant,
Da gregi el labour morse da ziveza ;
N'e deuz aoun rag hini evit griat, neza...
Ha m'hen tou deoc'h, evit ober henor d'he zud
N'euz ket var an douar eur plac'h a velloc'h brud !

JAKEZ

Guir eo : mes sempl ha bresk eo santelez an den,
Hag an Env dre hor c'housk a c'hell mad hor c'helen...

*(Pokat a ra d'he vugale en ho zal hag e tiskuez d'an tiad tud
azeza ouz taol).*

Ehan.





TAOLEN II

(Dirag ar Roue)

E Chinon, 6 a viz Meurs, da bardaez.
Eur zal e palez ar Roue, 90 troatad var 50, tri c'hant
marc'hek ebarz. Hanter kant goulouen var elum.

DIVIZ I

LA TRÉMOUILL, ALAN CHARTIER, tuchentil

LA TRÉMOUILL

Ep gaou na mar, guir eo : va c'hredit mad var-ze.
En he guiskamant du, var he zro eur c'hleze,
Ar Roue a velo ! emézh gant safar.
Ia, kempennet ken kaer, e deuz great — a lavar —
He fevar ugent leo, hag oc'hpenn... Kit da nac'h !
Hag henvel ouz eun Eal o c'hournijal var varc'h,
Dre 'n hent merket ganthi, daoust ha d'ar Zaoz, dinec'h,
E korn he zavancher e tigas deomp... an treac'h !

(An duchentil iaouank a c'hoarz).

ALAN CHARTIER, *divar ar penn araok*

Gra goap... ne guzez ket da voarizi ouzin,
Na c'hui, pennou avel, ra ho lez 'n eur c'hoarzin !
Eur c'haon berr o deuz great 'vit enkreuz hor Frans paour ;
Ho daelou na redjont na var mez Azincourt,
Na var ar Roue sod hag ar Rouanez fall !
Eur Roue nevez zo : c'hoari, c'hoarzin, fringal,
Sad' ar vuez ! dizonjeuz ar Vro mac'haniet
O vont kuit a dammou, ha dizale, beziat !
Ia, dreist ho c'hoarzaden, e lenv ar Franz abez,
Ha dre ma tosta falc'h an Ankou iud bemdez,
Me glev klemmaden veur tud Frans a vilionou
O vont vel an avel e dounna ar c'hoajou.

LA TRÉMOUILL, *o tostaat*

Ar barz, a leverer, a oar an traou kuzet :
Petra zonz mestr Alan, mar plij, eur ar Jeannett ?

ALAN CHARTIER

Me zonz, aotrou, e ra Doue ar pezh a gar,
E tigas e walen pa vel an torfed bar ;
Hag evel ar poder a dorr he bodez pri
Me zonz Doue a flastr eur vro dinerz, dispi...
Mes me a zonz Doue a bellai ar walen
Ma plij d'hor Prins, o klask dioual he gurunen,
Adzevel, stourm kalet, ha rei an treac'h d'he vir.
Nep a venn gounid, rank poania ken krenv ha dir.

LA TRÉMOUILLE

Gouarn mad zo paka he dro kent ha c'heller,
Ha Charlez ama c'hell he gortoz dibreder :
Pep tra 'n deuz evit ren...

ALAN CHARTIER

... Nemet rouantelez !

Spez eur Roue dinerz o koll skeud eur vro gez !..

(En he bart he-unan).

Kesterien henoriou, ah ! fistouled ma 'z oc'h,
Ma vijac'h bannet kuit, peb tra zafe guelloc'h !
Te dreist-oll, a zalc'h berr var frizillou Charlez,
Kamambre Isabeau, mevel torfetourez,
C'hoari da vestr a rez er palez-ma, den faoz
Hag a guz da ober flourik da gein ar Zaoz !
Uvreal rez (piou oar ?), gant da c'hoant digabestr,
Da deuler da graban var gurunen da vestr !

(Huel).

Ar gounid ? Deomp e vo pa n'en em zraillimp ken ;
Da venji hon tud koz kuezet var an dachen
P'en em glevimp, bugale d'ar memes mam-bro !
Deuz lezen milliget an divroad garo,
A bell zo vije bet diveac'hiet hor bro-Frans
Ma karje da Jarles plega an oll noblâns.

DIVIZ II

Ar memes re, CHARLES VII, DENIS AN DERO

CHARLES VII

Brao-braz e komzez, barz ! Ha breman eat da baour,
Vit da brezeg me garje rei did peziou aour.
Mes siouaz d'in, Lan geaz, n'oun ket pinvidik-mor :
Kouer ha roue 'deuz, ho daou, ken treut tenzor.
Manchou nevez zo stag ouz va dillad pemdez :
Dillad sul a bado hirroc'hik, a vele ;
Ar c'here a gasaz ganthan eur re heuzou
Ha n'hellen ket paea, pa brenen, d'an aotrou !

(da Zenis an Dero)

Pegement a jom deomp, arc'hantaer, ma ouzoud ?

DENIS

Pevar skued,

CHARLES

Ha netra ken er zizun da gaout !

(Da Lan Chartier)

Te glev petra lavar va arc'hantaer re biz :
Iun a rankomp, Alan, hed eun eil Koraiz.

ALAN

Nep en deuz esperans, en deuz aoualc'h, Aotrou.

CHARLES

Esperans ! Ah ! ma pad goude ker braz kannou,
 Red ve grizienet doun e kaloun roue Frans !
 Pep hent vo digor braz pa guezio Orleans.
 Clermont glaske miret ouz ar Zaoz da zigas
 Ho bevans euz Paris : koll e Rouvray, siouaz !
 Ha me, pa n'oun ket goest da gas sikour ebet,
 Euz an eil kear d'eben, me rank kila... tec'het !..
 Barnet omp d'ar maro. N'euz netra d'ober ken
 Goude eun taol ker kriz ; n'euz 'met plega hor penn
 Ha lezel da dremen justis Barner an oll !

ALAN, *gant nerz*

Nan, Mestr ! Pa 'z euz hano e zaje Frans da goll,
 An Env na c'hell ket, nan, dilezel hor bro baour.
 A viskoaz an Aotrou he galvaz d'he zikour,
 Ha pa 'z eo guir eo just, ne c'hell ket dizonjal
 Ar bobl kalounek bet he zoudard ken leal.

(krenvoc'h)

Ia, me a gred er Frans, kaloun aour, tom he goad ;
 Me gar startoc'h ar Frans, pa gresk he c'halounad :
 Bro dispount hag ampart, merc'h hena an Iliz,
 Bet renet gant Klovis, Charlemagn, Sant Louis ;

Ennhi kleze Guesclin steredennaz tro-dro ;
 Me gred ne zaio ket he brud koz d'ar maro,
 Labour zo c'hoaz dezhi, labour braz ha santel !
 D'he mipien, leoned pe kentoc'h ebestel,
 En em groaziaz guechall vit he difenn, eiz taol,
 Jezuz Krist anaoudek a rank rei eun digoll —
 Hag eur burzud ve red, evithi her graio,
 Pe varc'hoaz marteze, pe marteze hirio !
 Ah ! mestr, va zelaouit : n'euz ket bet deiz brasoc'h ;
 An heur-ma a c'hell rei pe gounid pe goll deoc'h ;
 Ar vesaerez iaouank deut daved roue Frans
 Piou oar ha n'eo ket hi guerc'hez an delivrans ?

CHARLES, *o tiskuez eul lizer*

Diganen ar plac'hik a c'houlen digemer...
 Ouz he gortoz, bian za va c'haloun.

ALAN

Esper

Rankit ; kalon ho pobl oc'h adzavo guelloc'h
 Eget aour tud ho lez : outhi deuit tostoc'h ;
 Da nep her c'har, ar bobl jom eur mignoun touet ;
 Ar roue dic'halloud hag ar bobl rivinet,
 M'en em glevont, a c'hell kannna 'r Saoz tu ha tu.
 Doue eo a gas Jeann : selaouit-hi dioc'htu.
 E kreiz an tarziou-mor eun den prest da veuzi,
 Dinerz ha rivet oll, dare da voeledi,
 A dap krog e pep tra, beteg er fleurennik!...

CHARLES, *o vuzc'hoarzin...*

Ah ! kaloun tom hor barz ! komz nerzuz ha flourik !
Mad, galvit-hi. Peguir en he lizer souezuz
Jeann a lavar e c'hell dianaout mad va stuz
Kenta tro m'am guelo, dezhi roomp he c'hoant.

(Da dud he lez)

Aotrounez, da biou ta va zron, va dillad koant ?
Eun tachad ar roue guirion a dle kuzat ;
Mestr al lez, La Tremouill, deoc'h ama da bignat.

(La Tremouill a bign var an tron, epad ma 'z a Charles e touez ar re all.)

EUN DIJENTIL

Antellet mad ar stegn. Bremañk ni velo
Penaos ar vesaerez iaouank en em denno,
Da behini ez ai : d'an duk pe d'ar roue.
Mes peoc'h ! Ema arru.

DIVIZ III

*Ar memes re, JEANN D'ARC gant IAN A VETZ ha BÉR-
TRAND POULENJOY ; d'ho heul, COLET A VIENN, ha
RICHARD ar goareger.*

*(Jeann a jom var dreujou an or. Den na lavar grik.
Jeann a zell ouz an oll hag e kerz var ehun varzu
ar Roue.)*

JEANN, *o plega eur c'hlin*

Va frins iaouank, Doue

R'ho pennigo !

CHARLES

Roue ? mes n'oun ket, eun all eo...
Ma faziit dioc'htu, varnoc'h e tiskredo.

JEANN

En han' Doue, c'hui eo, nan eun all. Perag nac'h ?

CHARLES

A beleac'h e teuit ? pe hano c'heuz, va flac'h ?

JEANN

Jeann oun hanvet. Adreuz Bourgogniz ha Saozoun,
Euz Vaucouleur beteg ho palez, hentchet oun
Gant Ian a Vetz, marc'hek, va armaz evelhen,
Gant Bertrand Poulenjo, eil mestr en hor banden,
Ha gant ho soudarded hag an daou servicher
A gasjot d'in : Colet, Richard ar goareger.
Dalc'hit sonj anezho : ar re-ma zo nerzuz
Ha n'ho tilezint ket.

CHARLES

Mes pe zarvoud grevuz

Ho tigas davedomp ?

JEANN

Deut oun da gemen deoc'h
 Dreizon vo torret kelc'h Orleans, ma keroc'h ;
 Dreizon e viot kaset da gear Reims, treac'h ato,
 Da veza kurunet, sakret gant an oleo.

CHARLES

Piou lavar ?...

JEANN

Va Moueziou, aberz Mestr an Envo.

CHARLES

Pere eo ho Moueziou ?

JEANN

Sant Mikeal, eal hor bro,
 Gant Santez Mac'harit ha Santez Katharin.

EUN DIJENTIL

Mes pa skuillont varnoc'h ho sklerijen divin,
 Ha c'hui vel var ho c'horf eur vantel o lintra ?

JEANN

/ Ha c'hui gav deoc'h Doue zo re baour d'ho guiska ?

UNAN, *trefoet*

Ha gallek a ouzont ?

JEANN

Guell egedoc'h !

(C'hoarzin a reer).

CHARLES

Deuet

Oc'h ta evit senti oc'h urz ho Sentezed ?..

JEANN

Ia, prins. Hag evit kaout ho touarou en dro,
 M'hen lavar d'eoc'h, den all ebet n'ho sikouro.
 N'euz den var an douar, duk, na prins, na roue
 D'ho savetei : n'euz nemedon, aberz Doue !

EUN DIJENTIL

Mes ma fell da Zoue e ve ar Frans salvet,
 D'hen ober he-unan eo goest ep soudardet...

JEANN

An dud en em ganno, Doue roi ar gounid.)

LA TRÉMOUILL

Mes ar vrezel n'eo ket ar c'hoari a gredit ;

Deskadurez zo red, ijin, hag amzer c'hoaz.
 Ne garfen ket ober poan d'eur plac'h trivac'h vloaz :
 Mes meur a gabiten, a bell zo boaz d'an tan,
 A c'hoanta eur mestr all d'ho hentcha d'an emgann,
 Eur mestr goest da c'hounid pa lammo da c'hourin.

JEANN

Doue a du ganen, piou vezo enep d'in ?

ALAN

An Env a skuill enghi he skerder, m'hen touo !
 He c'haloun entanet gant karantez ar vro
 A rai d'ar bobl tridal ha bale dizoursi :
 Kaloun iar d'ar re-ma, ha kaloun dir dezhi !

JEANN

Bennoz deoc'h, a zifen ar vesaerez dizesk,
 Hag a vel an danger bemdez o vont var gresk !

LA TRÉMOUILL, *goapaüz*

Eur barz eo, ha techet d'am dua dre ma c'hell,
 Eur spered kaer a zen, douget d'ar rimadell,
 Mestr Lan Chartier, da Charles Seiz sekretour braz .

(Kuit).

ALAN

Na meuz ket d'ober van euz da woaperez, keaz :

Diouaskell va ene nij dreist da gasouni...
 Ia, Jeannett, me a gred oc'h kannad Doue, c'hui !

DIVIZ IV

*Ar memes re, kannaded Orleans : DU TILLAY ha
 VILLARS, bleinet gant an DUK A ALANSON*

CHARLES VII, *da Jeann*

Va c'henderv Alanson, deut d'ho kuelek fenez,
 Hag e teufot a benn d'he c'hounid d'ho mennoz.

JEANN

Deuet mad oc'h ! Seul vui e vo a dud a ouen
 Rouaned Frans, seul vell aze trec'himp laouen !

ALANSON

Jeann, bian an esper, braz meurbed an anken :
 Goulennit, mar kirit, digant ar marc'heien
 Deut euz kear Orleans, deut da glask ho skoazel.

JEANN

Orleans ! Ah ! komzit. Pegeit hello herzel ?
 Ped dervez ?

VILLARS

Skuizet omp gant ar c'helc'h a starta
 Ar Zaozon var dro kear. Mouget omp. — Da genta

Bevans a deue deomp deuz Anjers, Bourj ha Tours ;
 Deuz Poitiers, ar Rochell, an houarn hag an aour :
 Mes brema n'omp ket goest da derri ar c'helc'h striz.
 Ne gaser netra deomp : bara vank da geariz !
 Merc'hed ha bugale, re goz ha kear abez,
 En em rei pe mervel rankint dre 'n naounegez.

JEANN, *da Farles VII*

Klevet a rit : eur bobl a gri varzu ennoc'h ;
 Dare int gant an naoun, daoust hag e talefoc'h ?
 — Va fromesa, ep mar ebet, m'her seveno :
 Arabad diskredi, Doue hor zelaouo !

(Ar roue a zell ouz an Env, ha Jeann a gendalc'h izel).

Klevit eur merk anat : me a oar pe beden
 A rajot eur pardaez p'edot oc'h-unan-penn.
 « Va Doue, eme-c'hui, ma n'oun ket map guirion
 D'ar Roue Charles VI, — na meuz ket brasoc'h aon —
 Da gendalc'her da stourm mirit ouzin a grenn.
 Mar d'oun bet penn abek d'am fobl euz he anken,
 Roit dezhi ar peoc'h, ha d'in an oll enkreiz. »

(Krenvoc'h).

Mad ! d'ar Roue oc'h map, m'hen tou, e guirionez,
 Ha var bro Frans, klevit mad, c'hui eo a dle ren.

CHARLES VII

O burzud ! Em c'haloun moa kuzet va feden ;
 Den n'her c'hlevaz nemet Doue... Mes ar plac'h-ma ? !

JEANN

Doue he diskuil d'in. Deut oun d'ho tizamma.
 En Orleans du-hont e trid kaloun ar Frans :
 List Jeannett da boania, m'ho ped, d'he delivrans,
 Ha d'ho ren da gear Reims da veza kurunet.

LA TRÉMOUILL, *seac'h he c'her*

Eun arme a c'houlén ! Ha n'eo ket penn-follet ?
 Eun arme d'eur plac'hik, d'eur vesaerez ! Erfin
 Follentez e vije ! Morse ne asantin.

CHARLES

Jeannett, gourc'hemennit : evel doc'h e lârin
 Hag an oll a zento ouzoc'h evel ouzin.

(Jeann a bleg eur c'hlin hag a bok da zourn ar Roue).

EHAN.



EIL ARVEST

Taolen III. — GUERC'HEZ AN DELIVRANS

Taolen IV. — CHARLES SAKRET !..



EIL ARVEST

TAOLEN III

Guerc'hez an delivrans

En Orleans, 7 a viz Mae 1429

Dianveaz Kastel an Touriou, a gleiz. A-zirag, eur voger
gant eur pont var al Loar, da vont en Touriou. A ziou
hag a bell, kear Orleães gant savaden ar Groaz-Kaer.

DIVIZ I

SUFFOLK, TALBOT, SCALES, GLASDALL

GLASDALL, troet varzu Orleans

Ah ! sorserez, dre be taol maji e teuaz
A benn d'hon touelli ha da jench tu d'ar vaz ?
Ganthi gedon ar Frans a stourm vel leoned,
Ha ni, bet o kelc'ha, breman a zo kelc'het.

SCALES

Ha kelc'het mad ! Aboe m'en em zilaz hounnez
 E kear, n'eo ket henvel an traou, en daou gostez.
 Kent e krenent razomp, ha brema e goapaont.
 Beteg' moger hon tour, dinec'h kaer e saillont,
 Hag o stourm ep ehan, ken flemmuz ha kelien,
 E skuizont ac'hanomp noz deiz. Hor marc'heien
 A red euz an eil tour d'egile, en aner :
 Ma ne deu sikour deomp, n'omp ken evit delc'her.

TALBOT

Goddam ! mes great on euz ive kement ioa red.
 Evit renta kaloun da geariz strafillet :
 Eiz dervez zo pe dost, ma tired ha bevans
 Ha soudarded, peb tra, d'adzevel Orleans.
 Ho « guerc'hez » a c'hell mont e meaz kear, he-unan,
 Ha den na grog ennhi, en diaoulez vian !
 Pa dostea da zellet ouz kistel ha touriou,
 C'hoarzin a reamp, dallet, euz hevelep taoliou :
 Eur vesaerez n'oa ken, eur vrac'h o randouni !
 Mes Satan zo he zad, pe Doue d'am daoni,
 Peguir d'ar plac'hik sod a zisprijemp kement,
 Hon tud, o kila trum, a lez digor an hent !

GLASDALL

Kerz ta ! Var an dachen, da Francizien koantik
 Ne gredont mont nemet chachet gant ar plac'hik,

Ha n'o deuz tam kaloun nemet da heul he zae !
 Ah ! krenerien ma 'z int, ar Zaoz varnho ra fae.
 Ha pa darzo an deiz, — mall eo ha pase mall —
 Ma c'hellimp stourm, dizhual kaer evel guechall,
 Ganeomp e vint kannet bep taol, evel ma reaz
 John Falstaff e Rouvray.

SUFFOLK

Ia, John en em dennaz
 Ep na laerjont dezhan he garrajou pesket :
 Mes abaoe ma kerz en ho fenn ar Jeannett,
 Diganeomp e laeront bemdez tour pe gastel !

TALBOT

Ha ma chomomp da c'hinaoui vel tud diboel,
 M'en em zraillomp bepred a daoliou teod, m'hen tou,
 Abarz nemeur tud Frans zaillo var an Touriou.
 Diouallomp, aotrounez, pe varnez koll emamp !

GLASDALL

Var va feiz, m'hel lavar, kalz guelloc'h vije deomp
 Mont da redek er meaz eget en em graouia :
 Sailla var egile zo trec'hi, peurvuia.
 Rak ma kuzomp bepred chouchet er c'hastellik,
 Petra lâro an dud, nemet ez omp aounik ?
 Ha d'ar chaseour eo tec'het dirag ar c'had ?)

SUFFOLK

Komz a rit entanet evel eur soudard mad :
 Eur c'hapiten a rank poueza piz var bep tra,
 Taoler evez, morse riskla an disterra.
 Hag erfin, pe zailla pe 'n em zifenn a reoc'h,
 Ma kuezit vit ho pro ker brâz enor vo deoc'h !
 Bourgogniz zo eat kuit : dre-ze omp dinerzet,
 Ha ganeomp ez a ken tano ar zoudardet
 Ma n'omp ket evit kas d'ar re c'houlén sikour.

(Da C'hlasdall).

Kollet neat e vijemp ma kollfemp en ho tour.

GLASDALL

Kent eget en em rei, mervel a raimp, aotrou !

SUFFOLK

Rak ma teufe ar Gall da baka an Touriou,
 Dioc'htu krenn soudarded ha bevans o defe :
 Hardisoc'h ho c'haloun, ha krenveat ho arme,
 Petra ve en tu all d'ho galloud, a gav deoc'h ?
 Ni, bet o kelc'ha kear, seiz miz, ato strisoc'h,
 Ni breman a rankfe treuzi buan al Loar...

TALBOT

Pe mervel, pe drec'hi, eveldoc'h m'hel lavar.

DIVIZ. II

Ar memes re, PONYNGS

EUN OFFISER

Aotrou komt, unan zo aze ouz ho koulen
 Mall ganthan kemenn deoc'h kelou braz, ... deoc'h epken.

SUFFOLK

Mont a ran, Aotrounez ; me ho ped, gortozit.

(Pellaat a ra gant an offiser).

GLASDALL, da Bonyngs

Deut oc'h erfin !... Pe geleier a zigasit ?

PONYNGS

Me a zonzj d'in emberr taoliou vo dioc'h an druill ;
 Ha ne gavan ket brao breman ho faka puill,
 Ni, boaz da vazata ar Francizien, kentoc'h !

SCALES, o skei var skoaz Ponyngs

C'hoari ar vrezel eo : hirio deomp, varc'hoaz deoc'h !...

PONYNGS, oc'h heja he benn

Doue ne deu ket mui, anat eo, d'hor zikour,
 Hag an diaoul evitho a laz-korf a labour.

(Pellât a reont).

TALBOT

Ama ta e rankomp delc'her penn ar c'hrenva.
Den na gilo troatad, hag...

SUFFOLK

Amzer zo. Skriva

Reer d'in n'en em glev ket re vad ar Francizien :
Jeann a lavar eun dra, eun all he marc'heien.
« Marc'heien, soudardet ha keariz var eun dro,
Eme Jeann, mintin mäd var ar Zaoz a zaillo ! »
Mes Gaucourt a viraz outhi. Kendaze ta
Eun dervez leun zo deomp evit pourchas peb tra.
Klevit : dre ster al Loar, em-berr, pa vo noz-dall,
Marc'heien, goäterien, gwäregerien hag all,
Euz keariou tro var dro ziredo d'hor c'hrenvaat
Hag ouz Orleaniz hon tud c'hello goapaat.

DIVIZ III

Ar memes re, eur Goareger, krog en eur bir

AR SOUDARD

Staget ouz ar bir-ma e teu deomp eul lizer.

SUFFOLK

Ho Jeann d'Arc eo, klaoustre, a gas deomp keleier...
Ia vad, diganthi, drez ! Deomp e ra gourc'hemen
Da vont kuit, ha dillo mar plij... ha netra ken.
Dre ma oar e tizec'h he c'hannadet kenta
Ouz ar groug, Jeann a gomz a belloc'h, petra ta !
Pa gav an tu da gas he liziri var nij
A ispill ouz birou, petra furroc'h, mar plij ?
« Salud, komt a Suffolk, Glasdall, Talbot, Scales
Hag oll Saozoun a voask keariou va frins Charles
Eneb peb guir ! Divar hon douar kerzit kuit,
Laoskit hor mogeriou, ha d'ho pro distroit, —
Ha d'an trumma : dreizon Doue hen gourc'hemen.
Anez, evit diskuez ema Doue ganen,
Feleac'h benag e viot, me ho punto er-mèz.
Ne skrivin ken deoc'h. Grit ho sonj. Me, Jeann, Guerc'hez
Orleans. »

GLASDALL

Ah ! drouk-ruz a zav ennon... Penaoz!...
Eur respount deread a rin d'houn-nez, malloz !
(Skriva ra).
« Pez fall, ma c'hoantez kaout an tour a zifennomp,
Lamm buan d'he baka : ouz da c'hedal emaomp ! »

(Eur goareger a daol al lizer e touez Orleaniz,
e savaden ar Groaz-Kaer. Trouz er meaz).

GLASDALL, *da geariz*

Kaloun oc'h euz, kuzet adren ho mogeriou !
 Deuz ta, labousik noz, deuz da gana soniou
 En henor d'ar Zaozoun, abarz beza lazet.

EUR ZOUDARD GALL

Ki oc'h harzal a bell peurvuia ne grog ket ;
 Ha pa ganimp ama, c'hui a ranko rei peoc'h,
 Bourgogniz ha Saozoun, paour keaz chas klanv ma 'z oc'h.

GLASDALL, *o teuler eur bir*

Dal a unan, morjin !... da gempen da lagad !

EUR GALL

Ha dal a zaou ! Va fez kanol a dizo mad.

(Eur boulet-mean a laz daou Zaoz).

SOUDARDED SAOZ

Oll var zao ! Ha buan ! Ha dao d'ar Francizien !
 Xaintraill, Dunois gantho, ha Jeann d'Arc en ho fenn !

TALBOT

Ia vad, redek a reont, err gantho, armet oll ;
 Treuzi a reont al Loar, e tu ar Zao-Eol !

SCALES

Bah ! dirag hon tud-ni e tec'hint dizale,
 Hag e saillimp varnho d'ho c'hempen a zoare !

TALBOT, *o tiredek*

Nan, arabad sailla ! Red eo chom en Touriou !
 Rag sellit oc'h keariz prest var ho mogeriou :
 Ma kerzomp kuit, dioc'htu merc'hed ha bugale
 Ziredo da zevi hor c'hastel... Ha neuze ?

SUFFOLK, *da C'hlasdall ha da Bonynys*

P'ema hon tour ganeoc'h, den n'he bako morse...
 Ma teufac'h, dre zarvoud, da blega goulskoude,
 Dre ar pont-ma, goestad hag en eur stourm, kilit :
 Ha d'am gedal, marvit mar bez red, mes dalc'hit !...
 Ennoc'h ta e fizian an Touriou da ziuall.

GLASDALL

Ra lammint oll outho mar keront, ha mil all !
 M'hen tou deoc'h, kaer o deuz ha iouc'hal ha skrimpa,
 Abaz eun heur me 'm bo desket dezho stampa !

TALBOT

Ra blijo gant Doue !...

GLASDALL, *d'he voaregerien*

Beillit ! Ha pa vo mall,
 Taolit birou ken a lakint an deiz tenval.

Ha ma pignont (burzud e ve) beteg ennomp,
Truez ebet : gant mein, goaf pe gleze, lazomp !

PONYNGS, *o sellet a bell*

Mes stourm a reer, ha stard, var a velan du-hont !

GLASDALL, *o sellet ive*

Ah ! Francizien daonet, diaoulou ma vezont !
Skrampa ouz moger lintr, dreistlammet douveziou,
Eur c'hoari eo dezho. Pa stag ho c'hrabanou,
Fors peleac'h, e talc'hont, e stourmont tal oc'h tal
Ha ne laoskont nemet trouc'het gant ar vouc'hal !
Pa vennont kila, Jeann o komz birvidikoc'h
Ho c'has araok en dro ; ha lan d'Aulon he floc'h
En he c'hichen a zav soun he banniel... Ah ia !

PONYNGS, *o vont er meaz*

Me rofe kalz evit dont a benn d'he c'hraouia !

GLASDALL

Pe kentoc'h d'he moug !

(O trei varzu ar zal).

Hounnez, deac'h diveza,

Pa zonjen mad e oan dare d'he zoulgofa,
A lavaraz : « Glasdall, te varvo ep koll goad
Pa bakimp da gastel. » — Gaouiadez ! te vel mad

An tour zisprij da dud ken dinerz ha kelien ;
Ha ma varvan, sell ma meuz goad ha mar d-e ien !
(O sellet a bell).
Brao-braz ! Talbot a zaill varnho... Hag e plegont !...

PONYNGS

Ma lammont eun eil dro dioc'htu, hor paka reont !

(Kuit).

GLASDALL, *o lammet er meaz*

Dao dezho !...

PONYNGS, *stouet divar ar c'hranellou*

Jeann a red araok. Dreist an douvez,
Stok eo ouz ar voger... N'euz den evit hounnez !...
Eur skeul a zav... Pilet !... Ma vije-hi maro !
He marc'heien he c'has pelloc'h... Na kaera tro !

(Trouz er meaz).



DIVIZ IV

Ar memes re, soudarded o tigas ar pesketaer JEAN POITEVIN

IAN POITEVIN

Pa laran deoc'h ne d-oun na soudard na spier !
Ian Poitevin epken, pesketaer dre vicher !

EUR ZAOZ

Ro peoc'h ha kerz eün ! Pe dioual d'az kroc'hen !
(*d'eun offiser*)

P'edo ouz hor spia, ni c'hellaz hen eren.

IAN POITEVIN, *outhan he-unan*

Re zivezad ! Dindan ar pont me meuz staget
Va bag leun a geuneud hag a beg entanet :
Pa glaskint tec'het kuit, pont ha tud a lesko !

EUR ZAOZ, *da Bonyngs*

Hen-ma d'ar groug, aotrou ?

IAN

Prest eo va ene : sko !

PONYNGS

Laoskit-hen. Ha te, komz. Ar virionez, buan :
Perag ar Francizien a lammaz d'an emgann
Pa felle d'ho mistri, d'an oll, chom da zale ?

IAN

Guir eo, ha pa glaskaz Jeann ober he bale
He soudarded d'he heul ha keariz var ho zro
Dor kear a gav prennnet, ha den na zigoro :
Gaucourt a zifen grons : « Den na 'z aio er meaz. »
Allaz ! bunted eo hen, bruzunet an or keaz
Ha c'hui oar an divez !

EUR ZAOZ

Ha petra deu da heul
Evidoud, ha te oar ?

(*Oc'h ober an neuz d'he grouga*).

PONYNGS

Stagit-hen ouz ar peul !

AR ZAOZ

Brao braz ! dirag he dud... Mad !.. Oh ! na leac'h kaera
Vit gueleet Jeann, ha marc'h Talbot oc'h he flastra !

IAN, *ouñhan he-unan*

Tud lach, hag a gar stourm kuzet en ho touriou,
Pa stourmomp-ni gwintet soun var beg hor skeuliou !

EUR SOUDARD, *o tiredet*

Jeann d'Arc zo goal-glazet ! Gounid omp ! He banden
A red du-ma du-hont, penn-follet, digempen.
Den na tra na viro : breman emaint deomp !
Seni a reont trei kein, ha varnho e kuezomp.

PONYNGS, *da Ian*

Petra zonjez, kanfard ? Ha brao za gant da dud ?

IAN

Doue r'hor zikouro !

PONYNGS

Hag hen rai eur burzud
Vit rei d'az sorserez pareans ha rekour,
Hi a dlïe hirio hor banna deuz hon tour ?

IAN

Nau ! Jeann a red en dro. Hag e kreiz an emgann
He banniel a c'hournij a uz d'an oll er vann.

Hon re-ni a oar mad ne gollint ket : dinec'h,
Didruez e skoont. Ar Zaoz a bleg... a dec'h.

(Saozoun a deu o tec'het spountet.)

PONYNGS

Ah ! kollet omp !... Hi zav euz a varo da veo !
Hon re-ni oll a dec'h dirazhi : chalmet eo !

GLASDALL, *o tont en dro*

Koz ier ma 'z oc'h ! Dre ma 'z oc'h aounik, hi zo krenv !
Nep a zoubl vel eur prenv a flastrer vel eur prenv.
Savit ! Harpet on euz-ouz tommoc'h emgannou,
Ar sorserez lounko ar c'hleze-ma, m'hen tou !
Guelet a reoc'h pe d'in pe dezhi an tomma !

IAN D'AULON, *er meaz*

Lost ho panniel zo stok ouz ar voger, brema !

JEANN, *er meaz*

Ar c'hastel a zo deoc'h ! It ebarz !

*(Drapo an Zaozoun a zo pilet divar ar voger ;
banniel Jeann a zaver varnhi.)*

DIVIZ V

LAHIR, *dirag* JEANN *o punta* GLASDALL *kuit gant he soudarded*; XAINTRAILL, DUNOIS, GAUCOURT.

GLASDALL *o kila en eur stourm*

Oh ! abarz

M'o pezo va lazet, n'e zeufot ket ebarz !

JEANN

Tost oud euz ar maro, Glasdall ! En em ro d'in !
Me meuz truez ouzid ! Ne dal ket d'id gourin,
Kaer teuz bet va dua, pardouni ran. Glasdall,
En em ro !

GLASDALL

Biken !

*(Ar pont a dorr dindanhan ; beuzi a ra er Loar ;
ar Francizien a deu hag a zres ar pont)*

LAHIR

Kerz gant an diaoul, pez fall !

JEANN

Oh ! Lahir, n'eo ket mad, fall eo komz ken c'huero.
Mes livirit kentoc'h : « Doue r'her pardouno ! »

LAHIR

Siouaz ! Pardounit, Jeann. Apaoue m'oun soudard
Me meuz var ar Zaozoun dare ^{hazet} pell ha stard,
Mes ne c'hounezan tra var va enebour all
— Krisoc'h c'hoaz, kriziennet ennon : va gizioù fall !
Petra fell deoc'h ! n'eo ket labour daou pe dri dez
Trei e sent daou varc'hek boaz, pell zo, d'an harnez :
Xaintraill ha me, bepred o klask piou ar falla
Evel ma klask ar Zent bepred piou ar guella.
O fouetta bro, gizioù a baker dishenvel
Eun tam mad euz ar re a blij da dud santel.
Mes, Jeann, d'am farea me labour deiz ha noz ;
An oanez ma 'z oc'h a gabestr ar bleiz koz,
Hag e kredan mont da glevet offerennou,
Kovez diou vech er miz, gant keuz, va fec'hejou,
Me, Lahir, ne zoujaz morse Doue na den !
Burzud eo na ouen ket kaset kuit da bourmen
Gant an tad Paskerel strafillet, pa daoljon
Va zamm eharz he dreid, en eur c'houlén pardon !
Mes nan ! ar c'hontrol beo ! Pardounet oun ! « Ha c'hoaz,
Emezhan, d'an Envou nijo va ene keaz ;
Eur pec'her o tistrei ro brasoc'h levenez
D'an Env eget kant den santel hed'ho buez ! »
Poania ran da zigoli an Hini va frenaz
Ha ne douan morse nemet dre va fenn-baz.

(Krenvoc'h)

Mes nep a c'hlaour varnoc'h, Santezik, — var eün
D'an ifern evel ar c'hoz ki-ze, mil garun !

JEANN, *o vuzc'hoarzin*

Mad, mad ! Peoc'h, Lahir ker ! Eur soudard evel doc'h
Vo pardounet bepred, ha p'hen do great goasoc'h.
Gouzout a ran piou oac'h, me vel piou e vezit :
Doue ho tigollo deuz al labour a rit !

LAHIR

Ah ! mar bez red evit paea va dleou koz,
Sailla d'an daou lamm ruz var ar Zaozoun fenez.
Ha skuill goad va c'horf paour dre hanter kant goul,.
Gourc'hemennit !

XAINTRAILL

Xaintraill a zo prest da zenti.

DUNOIS

Dunois ive !

GAUCOURT

Gaucourt ivez ! Iviziken
Me fell d'in dirazoc'h, Jeann, stoui va bleo guen.

JEANN

Bennoz Doue deoc'h oll ! Aotrounez, 'n hor bro-ni
Chom dilabour a zo doaniusa melkoni :

Boulc'het mad eo hirio, varc'hoaz vo kendalc'het
Beteg ma redo kuit euz kear ar Zaoz nec'het.
Peleac'h benag ez aint, var ho zeulioe ez aïmp,
Ha pa vent a ispill ouz an oabl ! N'ehanimp
Nemet eur vech e Reims evit sakr ar Roue,
Hag ac'hano buan da Baris.

(Oll kuit).

IAN POITEVIN

Jeann, ha me ?

Va distagit, mar plij !

LAHIR

Piou hen-ma ?

IAN

Aotrounez,

Pesketaer oun. Paket gant Saozoun didruez
Ereet oun bet gantho. Mes tan va bag uzaz
Koataj ar pont, ker brao ha ken trum ma freuzaz
Ha ma taolaz en dour Saozoun, armou hag all.

(Hen distaga reer).

IAN D'AULON

Ar virionez eta oa gant Jeann ! Korf Glasdall,
Beuzet he-unan, zo eun testeni anat ;
Vel ma lavare Jeann : Marvet eo ep' koll goad !

JEANN, *da Boitevin*

Den oud, kaloun ec'h euz ! Doue d'az benniga !

IAN

Va dever a meuz great. Piou n'her grafe ket, pa
N'euz nemet mont d'oc'h heul ha kemer skuer varnoc'h ?

JEANN

Te riskle da vuez, dispount.

IAN

C'hui dispountoc'h
Gerz ken seder ha tra dre ar stourmou diroll.
Digollet oun aoualc'h mar kavit mad va zaol.

JEANN

Pebez ouen tud vad ! Piou 'n em virfe d'he c'haret !
Goas da nep a gredo beza he diskaret :
Seul izeloc'h he stad, seul krenvoc'h he imour ;
Ha ma ouezit he ren, burzud vo he labour !
Var be dachen er bed ne redaz ket d'ar c'hloar ?
O ! Salud, ouen tud Frans, bro garet, bro dispar !

(Krena ra o kas he dorn d'he stomok).

LAHIR

Mes krena rit... Petra..?

JEANN

Eun tam debron epken
E toul gouli va skoaz : eun taol bir, pa baken
Gorre kleuz ar Saozon, va filaz en douvez.
N'oun ket ker boaz ha c'hui d'an taoliou, mignoun kez.

LAHIR

Krouadur paour, perag en em deuler en tan
En despet deomp, nijal e goasa an emgann !
Grit o tever : red eo. Mes n'oc'h ket fur, m'hen tou,
O lammet ar genta dindan glao ar birou.

JEANN, *trist en eur vuze hoarzin*

N'eo netra : va micher zeskan dreze. Siouaz !
Grit implij vad euz Jeann ! Ne badin nemet bloaz.

LAHIR

Mes piou rafe aon deoc'h ?

JEANN

Den, nemet an treitour...
Mes peoc'h var ze. — Peguir ema deomp-ni an tour,
Lezomp tud da veilla hed an noz, e ken kaz
Ma teufe ar Saozoun en dro da glask tregas,

Ha ni, deomp d'an iliz da veuli an Aotrou :
Eun ehan a vo mad goude ker goal stourmou.

(Kuit dre eun or striz).

GAUCOURT

Nan, Jeann, list an or-ze ; ar pont zo adsavet
D'ober deoc'h eun hent meur : kit dreizhan, me ho ped.
Pa 'z ajot kuit euz kear, me iouc'he drouk ennon :
Hag e teuit en dro, bet flastret ar Zaozon !
O Jeann, fallakr oun bet evidoc'h : pardounit !
Sal' e ven bet ker fur hag hon tud keiz ! Klevit
Ho zoniou, ho jouc'hou laouen a garantez :
Ho tigemer a raint evel ho Rouanez !

Ehan.



EIL ARVEST

TAOLEN IV

Charles sakret

Reims, 17^d a viz Gouere 1429

Dirag iliz veur Reims, dorjou sarret, en tu diou

DIVIZ I

ALANSON, DUNOIS, LAHIR

DUNOIS

E kear Reims emaomp ta ? Jeann her promette deomp :
He ger zo deut da vir. — Ah ! kenderv, pa zonzomp
Nag a gemm zo etre ar c'hloar a darz breman
Hag ar goaligner koz, me gred ec'h uvrean.

ALANSON

Ker braz souez zo d'in, Dunois. N'euz ket tri miz,
Piou zonje Orleans a dorrfe he c'helc'h striz,
Ar Zaozoun a gollfe peb kear a-hed al Loar,
Ha ni zafe ken trum d'ar gounid ha d'ar c'hloar ?
Goelvan ha kaon, pell zo ne glevet ken e Frans ;

lamentation

Ar vro gerze d'ar bez, kollet peb esperans,
 Kollet peb tra... Hirio Roue Frans vo sakret,
 Ar vro dregern abez, gant eur plac'h diereet.
 Pep kammed eur gounid, hag eur gear bep dervez !

LAHIR

Me vel c'hoaz Jeann var varc'h o tont dre 'r pont nevez
 Beteg kreiz Orleans. Tud boke d'he dillad
 O lenva, o kana peb eil, tud eur boblad !
 Ha goude ar Saozoun buntet kuit a bep tu,
 Jargeau, Meung, Beaugency paket ganeomp dioc'htu,
 Skalez, Suffolk, Talbot zoken o plega deomp,
 Oc'h en em rei varlerc'h he dud a beurgasomp
 Var dachennou Patay, daoust ha d'ho goafou hir,
 D'ho hernezioù houarn... ha d'ho c'halonou dir...
 Eur plac'hik, ken santel ma troaz peb soudard
 — Pep pec'her evel don, siouaz ! — 'n eur c'hristen stard,
 Ken birvidik he ger mac'h entane peb den,
 Hag er stourmad, lemm he lagad, he dremm laouen,
 Treac'h d'ar guella marc'hek vit ren ar c'hanoliou,
 (Pa zeskaz ar vrezel 'n eur vesa oanigou !)
 Brema d'hor Roue paour e restaol Frans abez !
 Ha biskoaz kement all ? Doue 'n he vadelez
 A ra burzud dreizi. Ha savet ken huel
 Hi — burzud ker braz all — a jom ato henvel,
 Difouge, dous ha mad evel en he zi paour :
 Mad... beteg louzaoui he brasa enebour !
 Hor bugale vian, e korn an oaled,
 Na gredint ket ar burzudou hon deuz gullet

Hag a gouñtimp dezho. « Mes, eme Lan Chartier,
 Gloar Jeann a lintro splam eun deiz e peb karter ;
 Ha pa zavo eur barz da veuli hor guerc'hez,
 Pegen santel ha kaer ha divin he buez,
 An dud o lenva forz var he lerc'h a gano
 Hag en enor da Jeann ar bed oll dregerno ! »

DIVIZ II

Ar memes re, ALAN CHARTIER

ALAN

Ia, hag e talc'han c'hoaz d'ar pezh a lavarjon :
 Bemdez e tiskuez deomp madelez he c'halon.
 D'intanvez Duguesclin, Jeann a Laval, c'hui oar
 — Evit diskuez doujans d'ar marc'hek vit he c'hloar
 Ha d'an itroun evit he zantelez, — ha c'hui
 Oar petra deuz sonjet Jeann da ginnig dezhi ?

LAHIR

Ar c'haera donezoun, moarvad, eun dra dibriz.

ALAN

Ar bizaoued arc'hant a zouge var he biz !
 Kaer 'n euz ar Roue rei da Jeann dillad seiz,
 Perlez ha braouigou, arc'hant hag aour eleiz :
 N'eus fors, netra na blij d'he c'halon ken tener
 Evel ar bizou paour a zalc'h deuz he mam ger.

Guesclin ha Jeann ! dalc'hmad ho daou en em glevont,
 Kemm ha kemm, dre vürzud, dreist ar maro ez eont :
 Ar marc'hek a vöulc'haz labour an delivrans,
 Gant ar plac'hik e vo peur-adzavet ar Frans !

LAHIR

Ia, burzud eo, Alan : mil bennoz da Zoue !
 Rag eul labour diez oa digas ar Roue
 Beteg Reims, en despet dezhan ha d'ar Zaozon.
 Mes piou harzo ouz Jeann hag ouz nerz he c'halon ?
 Tud al lez a zave digareziou bepred :
 « Mont keit-ze ! ken nebeud kezek ha soudarded !
 — Ken stank an enebour ! — Perag redek ken trum
 Ha lezel var hon lerc'h ar Zaoz d'en em zastum
 Evit sailla varnomp ? Ne c'helfemp nemet koll :
 Fur vije da genta paka ho c'hearious oll.
 Aboe pell ar Roue zo peur-goullo he ialc'h,
 Hag ep arc'hant ne gavo ket a dud aqualc'h. »
 Mes e kaloun Charles Jeann a c'huez he fizians :
 « Aotrou, kerzit da Reims hag e viot Roue Frans ! »
 Mes ne greder ket mont ! Dale, dale ato,
 Kuzul deac'h ha kuzul varc'hoaz ! Den na zento
 Ouz c'hoant birvidik Jeann, hag er Zaozoun bemdez
 E sav divar hor c'houst nerz ha fouge nevez...
 Ar Roue zo re baour da baea soudardet ?
 N'euz fors ! ep komanant eun arme vo fardet :
 Ni oar karet hor Frans ep lenva d'ar mizou !
 Ar marc'hek a breno stern ha marc'h hag armou ;

Mar d'eo berr he arc'hant, ez ai da voareger.
 Oll, paour ha pinvidik, a zired prim ha ter,
 Hag e kreiz peb kaloun goad a lamm tom-bero
 Gant eun ioul ken : mervel laouen evit ar vro.
 En hent, erfin ! En dro da Jeann en em vodomp ;
 Keariou, kestel, ep stourm a zigor dirazomp —
 Ama deac'h e triomf e ouemp digemeret,
 Ha varc'hoaz ar Saozoun, souezet ha kounnaret,
 A glevo Charles Seiz vo bet sakret erfin,
 Hag ho galloud a vo torret mad, a gav d'in.

ALANSON

N'eo ket eul labour eaz na c'hoari-bugale
 Klask ober d'eur menez flach, sevel, ha bale.
 Diesoc'h d'an estren plega d'he lezennou
 Tud savet soun, ha goad dindan ho ivinou.
 Mes Paris a rankomp paka c'hoaz, a ouzoc'h.

DUNOIS

Siouaz ! varze, aotrou, piou a zento ouzoc'h ?...
 Pa c'houlennomp oll mont d'an trumma var araok
 Dre ma c'helfemp brema peur-drec'hi, rust ha rok
 La Tremouill a ra deomp tarda, var zigarez
 E rank gant Bourgogniz sina 'n unvaniez !

LAHIR

Dre va fenn baz ! Unvaniez ! ober ar peoc'h !
 Mes, klask staga an tigr pa lamm a ve furoc'h !

Me lavar evel Jeann, ha furnez eo michans :
 « N'euz peoc'h ebet da gaout nemet a daoliou lans,
 Dao, d'ar stourmad ! » Miret ouz ar Zaoz d'en em drei ;
 Trum, var eün ! lakad kear Paris d'en em rei :
 Setu mennoziou Jeann, ha gouzout a rankan
 Ma vo pleget dezhi.

DIVIZ III

Ar memes re, JAKEZ D'ARC, PER D'ARC

PER

Hano Jeann a glevan.
 Dre 'n tu-ma d'an iliz ez aio ar Roue
 Gant tud he lez en ho c'haera. O va Doue !
 Va c'halon lamm em c'hreiz, guech laouen, guech nec'het...
 Va zad, goulennit ta ouz an aotrou...

JAKEZ

M'ho ped,
 Ho figarez, aotrou ! Deuet omp euz a bell
 Da velet, ma c'hellomp, lid ar Zakr hag ar gouel.
 Kouërien paour, ha den n'hor c'haso kuit ac'hann ?
 Hag oc'hpenn, livirit : ha ni a velo Jeann ?

LAHIR

Va den mad, c'hui ranko mont da heul an engroez :
 Tud ar Roue breman en em vod er palez.
 Mes ma teu Jeann, ma ne deu ket, petra ra deoc'h ?

JAKEZ

Me zo he zad.

PER

Ha me, he breur. Vel ma ouzoc'h,
 Eun dudi vije deomp...

(An tri dijentil a stou dezho).

LAHIR

Pardounit d'in, d'ho tro :
 Kerent Jeann a zo par da genta tud ar vro,
 Eun enor braz eo d'in ho servicha. M'ho ped,
 Deuit ganeomp. Mes dres, Jeann zo en em gavet.

DIVIZ IV

*Ar memes re, JEANN, XAINTRAILL, Comt BEAUVAIS,
 tud oc'h he c'hourdrouz*

XAINTRAILL

Panefe-c'hui, an dud o dije he lazet !

JEANN

Ra 'z aio kuit ! Me oar perag eo diguezet :
 Guerzet d'ar Zaoz, aman evitho e labour.

XAINTRAIL

Aotrou, mevel d'ar Zaoz, ha d'ho pro enebour,
 Deut oc'h da zevel kear enepdomp, ma c'hellit :
 Mes kear abez a jom fidel, hag ho kas kuit !
 Ha c'hoaz bezit euruz pa n'oc'h ket bet flastret :
 Jeann eo, bet treac'h d'ho mennoz fall, e deuz miret.
 Tec'hit ac'han, aotrou, ha dalc'hit sonj petra
 Ra Jeann evidoc'h-c'hui.

Komt BEAUVAIS, *o tec'het*

Ne zizonjin netra.

(Ar bobl a glask he laza).

JEANN

List-hen da vont e peoc'h, ha ne gounnarit tamm !
 Ra vezo joa epken en deiz-ma !

*(Guelet a ra he zad hag he
 breur hag e za d'ho briata,
 epad ma kil Alanson, Du-
 nois, Lahir).*

Ha va mamm ?!

PER

Dont a rai dizale... He guelet a ri c'hoaz !
 Abaoue seiz miz zo, nag a draou, va c'hoar keaz !
 Doue zo mad, a-ro did nerz gant he c'halloud !

JAKEZ, *o plega ar c'hlin*

Pardoun d'in da veza, Jeann, diskredet varnoud !

JEANN, *oc'h he adzevel*

Pardoun ? mes em c'henver n'ez oc'h bet nemet mad,
 Ha deoc'h-c'hui, mar plij, eo va bennigen, va zad !
 Salo d'in e c'helfen, va c'harg peur-zevenet
 Mont en dro d'hor c'hearik, leac'h m'o peuz va ganet,
 Mont kuit ganeoc'h... mar plij gant ar roue, siouaz !

PER

Oh ! mont hon tri d'ar gear ve eun dudi re vraz.
 Arabad hon deseo, Jeannett, gant eun esper
 Ken dous, hag a rofe deomp eun taol ken pounner
 Ma rankfez chom varlerc'h ! Hor c'halon a dorrfe.
 Gant tud divar ar meaz, brema, te a vevfe ?
 Azkemeret dillad, gizioù... nan, va Jeann ger,
 N'helli ket mui, n'oud ken eur vesaerez dister.
 Boaz oud ouz tud a lez, ouz dillad aour ha seiz,
 Penaoz helfez beva eveldomp-ni, tu ! keiz !

JEANN

Dishenvel an dillad, ar galon jom henvel.
 Eurvad ho merc'h n'eo ket sevel 'n eur renk huel,
 Mes griat e kichen he zud muia-karet.
 Ar peoc'h, al levenez a jom du-hont bepred,

E Domremy, dindan ar fao, tost d'ar feunteun...
 Menjett a gustume lakad he fodad leun,
 Azeza var ar mean d'am gedal... hag hon diou
 E tistroemp d'ar gear e trao ar menezioù.
 Hag al liorz ken kaer gant he lili guen-kan,
 Ken dudiuz gant trouz diouaskel ar guenan!..
 Ha c'huez vad zo ato ? ha mel zo da danva ?..
 Ah ! du-hont, du-hont eo e fell d'in c'hoaz beva !

JAKEZ

Da lezel da vont kuit ? pa 'z oud he vir skoazel,
 Ar Roue, Jeann, ma c'houlennet, ranko herzel.
 Padal, c'huek eo d'an tad trec'het gant ar gozni
 Guelet he vugale, oll, en he angoni.
 Ah ! ma teurvez hor prins rei an eurvad-se d'in,
 M'hen trugarekaio var bennou va daoulin !

DIVIZ V

Ar memes re, IAN A LUXEMBOURG, LA TREMOUILL

LA TREMOUILL, da Jakez

Arabad deoc'h, varze, kemeret nec'hamant :
 Var va ali, ar prins a roio deoc'h ho c'hoant.

(Da Jeann).

Pa glev ema erru ho tud, ar prins Charles
 A gemenn dezho mont d'ar Zakr gant tud he lez :
 Kit d'ar palez eta, ho tri.

(Da Ian a Luxembourg).

Var va ene,

Kaera tro d'he c'has kuit a gichen ar Roue !
 A hent all, ma lezomp Jeann d'ober dioc'h he c'hoant,
 Den ama na roi deomp goasoc'h diezamant ;
 E berr amzer, ve goest da douelli an oll,
 Mestrez e vije-hi, ha me a vije koll !
 Ra 'z aio kuit eta, hag he zad d'he delc'her !
 Goude ar Zakr, me oar petra jomo d'ober.

(Outhan he-unan).

Mes da c'hedal, bezomp louarn, ha diouallomp !

(Da Ian).

Dre-ze, an duk Philip a ginnig restaol deomp
 Paris eb stourm ebet ?

IAN A LUXEMBOURG

Eun arzao, mar plij deoc'h,

C'helfe beza sinet da c'hedal sina 'r peoc'h.
 Skuiz eo ar Zaozon : mes ho Prins zo skuisoc'h c'hoaz ;
 Torret e vo buan an imor her broudaz,
 Pa vo Jeann kaset pell.

LA TRÉMOUILL

Pè c'hoariell vo mad

Da rei d'ar moumoun-ze, bugel daoust ha d'he oad,
Drouk pa stok ouz rozen, sioul pa bak braoigou ?

IAN

Aotrou, me oar anaout e lez Renan d'Anjou
Eun itron bleo-melen, glaz ha flour he lagad,
Ken koant ma tle beza d'eur roue deread...

LA TRÉMOUILL

Deut eo ganeoc'h, aotrou !... Oc'h itron, a gav d'in,
A zo Agnes Sorel, brudet vit he ijin,
He c'haloun denerik, he gened hag he mouez :
Me fell d'in, dizale vo plac'h d'ar rouanez.
Eun techik a lakeaz meur a roue da goll,
Eur zi fall ne vir ket vent karet gant an oll.

IAN

Ha n'eo ket mad ive m'anavezont re skler
Pe guzuliou, e kuz, evitho e saver :
N'int ket goest da c'hoari gant traou ken labouruz,
Ha ministred o deuz hag a oar, ijinuz,
Dibuna pe dröuc'ha an neuden, dioc'h ma vez.

LA TREMOUILL

Sal ho kras ganen-me n'euz nep troidellerez,

Na guzan ouz an duk komsou nag oberou.
Kemennit ta dezhan e rin he labourou,
E kasin dizale guerc'hez Orleans pell
Hag e c'hellimp rei fin pe arzao d'ar vrezel.

(Ar c'hanoliou a groz).

Mes poent eo deomp mont kuit. Ar prins ha tud he lez,
Pa groz ar c'hanoliou, 'n em denn euz ar palez
Hag an dud a red stank da velet al lidou

(Ar bobl a zired a bep tu).

AN OLL

Buez hir d'ar Roue Charles Seiz !... Bennoziou
Da Jeann, a zijaden ar Frans aberz Doue !
Doue d'ho diouall ! Gloar dezhan ! Gloar d'ar Roue !

*(Marc'heien, tuchentil, beleien, eskipien a gerz varzu an
iliz veur, Charles VII d'ho heul. Ar c'hanoliou a groz ;
ar c'hleier a zon var vole ; diabarz an iliz a veler, dre
an or-dal digor braz, sklerijennet gant goulaou a
vilierou).*

EHAN



TREDE ARVEST

Taolen V. — GUERZET ! — Taolen VI. — BARNET !

Taolen VII. — AR VERZEREZ



TREDE ARVEST
PEMPED TAOLEN

Guerzet !..

E miz Gouere 1430, e kamp lan a Luxembourg
E Margny, tost da gear Compiègne.

DIVIZ I

AN DUK A VOURGOGN, IAN A LUXEMBOURG

AN DUK

Eun dra ken a ouzon : « vit gounid, amzeri ! »
Hag amzeri a ran, ep trouz na cholori.
Gouzout a rit, aotrou, ma c'hounezan dre-ze.
Charles a bak keariou-eyel ma kar : neuze
Prometti ran dezhan paouez d'ober brezel ;
Ehan a ra ; dallet gant gloar he zakr, e vel
En uvre Frans abez o stoui d'he zaoulin :
Hag e kasan sikour d'ar Zaoz, en eur c'hoarzin !

IAN

Tommoc'h ve bet d'hon ler ma karje Charles Seiz
 Beza selaouet Jeann ha kerzet noz ha deiz
 Euz a Reims da Baris, dre an hent meur, ep rei
 Amzer na d'ar Saozon na deomp-ni d'en em drei.

AN DUK

« Araok bepred » a dle beza ger eur soudard
 Evit guir ! Mes an duk Philip zo eur c'hanfard
 A oar deseo an dud p'her c'hredont re vuan :
 Charles a c'hedaz pell eun arzao ep emgann,
 Ha pa zonjaz erfin stourm, he dud a gilaz
 Bet' al Loar. Er c'houlz-se va marc'heien bakaz
 Kear Soissons da genta, hag ez ajont dioc'htu
 Varzu Compiegn, a oue kelc'het striz a bep tu.
 Jeann a glev : « Me rank mont, emezhi entanet,
 Da zikour an dud oue ato va mignouned ! »
 Hag ep goulenn aotre, gant tri c'hant kamalad
 E tired, e tiguez, e tifenn he c'hear vad,
 Ha da noz, evithi da veza sorserez,
 Traped eo... marteze var bouez iudazerez.

IAN

Marteze ?... Anat eo : ar gouarner Flavy,
 A du ganeomp e kuz, a gollaz anezhi.
 Tenn hag hir oue ar stourm. Skuizet oll e rankjomp
 Kila diou pe deir guech dirazhi, drouk ennomp

He banniel en dourn kleiz, he c'hleze en dourn diou,
 Jeann a lamme dispount dindan glao ar birou :
 Edomp koll, pa deuaz ar Saozon abenn err
 Adren Jeann da viret na zistrofe e ker.
 Mes gant d'Aulon, Xaintraill, Per d'Arc, pebez krogad !
 Ho zaoliou a guez puill, dalc'hmad e strink ar goad...
 Dre douez hon tud an hent ruziet oll a zigor,
 Varzu kear e nijont... Re zivezad !... An or
 Zo serr, ar pont savet, ha kuezet an oged :
 Kollet int ! Mes delc'her a reont vel leoned.
 Eur goareger a jach var Jeann dioc'h an adrenv :
 Pilat ra. Kaer e deuz 'n em zifenn ha skei krenv,
 An oll a lamm varnhi : paket eo ! — Ha laouen
 Hon re-ni, treac'h erfin, a laosk eur iouc'haden.
 « Ema deomp ! » Da geariz strafillet an ekleo
 Kerkent a gas iouc'hou ha kelou : « Deomp-ni eo ! »

AN DUK

Ema deomp ! Ar preiz eo dioc'h an dibab, dispar...
 Mes petra raimp ganthi ? Euruz an nep her goar !
 Ar Saozoun a c'houlenn m'he c'hasimp da Bariz :
 Nac'h outho ? N'eo ket eaz. Hag oc'hpenn-ze, ar priz...
 Petra rin ? — Mes setu ema deut komt Beauvais :
 Perag e teu, c'houi koulz ha me hen anavez.
 Diouallomp ! Gant hen-ma diskredi a ranker.

(*Ian kuit*).

DIVIZ II

AN DUK, KOMT BEAUVAIS

KOMT BEAUVAIS, *o saludi*

Aotrou duk, davedoc'h oun deut gant daou lizer ;
 Ar c'henta vo da rei d'an aotrou Ian Ligny,
 Ha resevit, mar plij, an eil zo oc'h-hini.

AN DUK, *goude beza roet d'eur zervicher al lizer da gas
 d'an ao. Ligny, a lenn he hini :*

« En hano Herry Pemp, roue ar C'hallaoued
 Hag ar Zaozoun, mestr gallouduz ha tad karet,
 Ni, Komt e kear Beauvais, a bed hag a c'houlenn
 Ma vo lakeat etre hon daouarn, — vit dougen
 Ar varnedigez red varnhi, — eur sorserez
 A ra brezel bloaz zo, hanvet Jeann ar Verc'hez
 Ha dalc'het e prizon gant Ian Komt a Ligny.
 Entent ouz he frosez na zell 'met ouzomp-ni.
 Evithi da veza sorserez, nan marc'hek,
 Goulskoude vo prenet gant hor mestr galloudek.
 Ha c'hoaz evel eur prins Jeann a vo paet deoc'h :
 Aotrou duk, dek mil lur aour eo a resevoc'h. »
 N'eo ket pedi a rit, aotrou, mes gourc'hemenn ;
 Mad, ne c'helfot ket kaout ar verc'hez diganen.

KOMT BEAUVAIS

Penaoz ? C'hui zo nec'het ? Evidoc'h pa labour
 An env, c'hui vije deoc'h oc'h-unan enebour ?
 An hini a stourmaz en oc'h enep dalc'hmad
 Oc'h hada torfejou, goaperez, o skuill goad
 Ho kuella soudarded, — a guez en ho taouarn
 Hag e virfac'h ouzin pa ginnigan he barn ?
 Da c'hedal ma vezo kastizet he-unan,
 Ar Roue pa goll Jeann a goll peb tra breman ;
 Epdhi na c'hell gounid morse. Ato trec'het
 Ne rai nemet krena, koll kaloun ha tec'het.
 Ma laoskit ar plac'h-se ganen, me respount deoc'h
 N'hon do mui da gaout aon. Duk, ha refuz a-reoc'h ?
 Ah ! merc'h Satan ma 'z eo, hi a zavaz an dud
 E va enep, em c'hear Beauvais, dre gomsou iud ;
 Ha va zujidi sod, troet ho fenn ganthi,
 A reaz deomp tec'het kuit euz hon douarou-ni...
 Ah ! kas e meuz outhi !

AN DUK

Ha me, ouz he Jarlez,
 Ouz ar prins digalon a vuzc'hoarze divez
 P'edo he vevelien o laza va zad ker !

KOMT BEAUVAIS

Mar kirit ta, hon daou flastromp an aer-viber !
 Ma roit ar plac'h d'in, ar Roue vezo deoc'h :
 Pakit ho tro brema, ne gavfot ket guelloc'h.

Kear Compiegn, aotrou duk, zo var hon douar-ni ;
 Eno oue tapet Jeann ; den na viro outhi
 Da veza digaset dirag he guir barner,
 Dirazon ! Ha plijet ganeoc'h rei d'in ho ker.

AN DUK

Klevet a ran. Ma n'euz nemedoc'h goest d'he barn,
 Delc'her ha trei a reoc'h he frosez 'n ho taouarn ;
 Tamallet e vezo da vont enep ar feiz,
 Da drompla an dud vad, ha da veva direiz.
 Dre-ze, kollet he brud, vo easoc'h he... laza.

KOMT BEAUVAIS, *o tostaat*

Aotrou, dibuna rit an neuden ar goasa :
 Great omp vit labourat var ar memes tachen !
 Ma vez ho skouarn tano da glevet va feden,
 C'hui oar hor mestr Herri ne rai ket gaou ouzoc'h :
 Boutin oc'h var ar preiz ; dre-ze, pa zilezoc'h
 Ho loden d'ar roue, hen a rank ho tigoll.
 Ha sonjit mad, aotrou, e viot digollet oll :
 Dek mil lur aour ! mes eur roue n'eo ket kerroc'h !

AN DUK

Iškariot !

KOMT BEAUVAIS

Nan, nan, duk ! Goal-fazia reoc'h :
 Judas ne brenaz ket he vestr, mes he verzaz.

AN DUK

Ha me eo ar Judaz ?

KOMT BEAUVAIS

C'hui eo hel lavaraz !

AN DUK, *outhan he-unan*

Te, Kaïfaz !

(D'ar c'homt).

Mad ! Grit ma vo talvouduz deomp
 Pa roan ho c'hoant deoc'h. Ha brema, difreomp.

KOMT BEAUVAIS

Great ar marc'had ! Dek mil lur aour o po da gaout
 P'am bezo Jeann. Mes n'ema ket en ho kalloud :
 Penaoz lakâd ar c'homt da ziskregi outhi ?

AN DUK

Ar c'homt zo va marc'hek : ouzin e rank senti.

(Ar c'homt kuit).

DIVIZ III

AN DUK, IAN A LUXEMBOURG, *lizer komt Beauvais
ganthan en he zourn*

AN DUK

Ne c'hellomp delc'her ken Jeann en hor prizouniou.
En hano an Iliz hag Herri Pemp, aotrou,
Komt Beauvais a skriv deomp daou lizer dem-henvel
Da gemen deomp he rei. Komz a ra ken huel
Ma plegimp, pe vezimp dezhan enebourien
Ha paket neat etre Saozon ha Francizien :
N'ez in ket d'en em goll evit eur sorserez.
Oc'hpenn, oc'h he leuskel pebez gounidegez !
Jeann a zo chadennet ; mes hon-unan, guelit,
Var evez noz ha deiz d'he miret da vont kuit,
Kraouiet omp koulz hag hi. Rag, ma c'helfe tec'het
An oll gredfe ez eo burzud, eb mar ebet.
E Beaulieu, tost aoualc'h e oue d'en em jacha,
Ha ma teu pe Satan pe Doue d'he hentcha,
Euz hon touriou piou oar ma n'helo ket nijal ?

IAN

Doue he roaz deomp, deomp eta d'he diouall.

AN DUK

Ah ! truezi a rit Jeann hag he stad garo ?

IAN

Rei ar verc'hez d'ar Zaoz zo he c'has d'he maro.

AN DUK

Mar bez red vit gounid kaloun ar Francizien,
Charles Seiz he freno digant he barnerien.

IAN

Pa ginnigfe oll aour ar bed, n'he laoskint ket.

AN DUK

Kaoziou aoualc'h hon euz, aotrou komt, dispaket.
Berr ha krenn, ma kav deoc'h ez eo eur falloni,
Anzavit va enor a dal mad oc'h hini :
Ha pa ran, e c'hellit ober. Mad, devet omp
Gant ar c'hoant da zevel hor stal en dra c'hellomp.
Ne vank nemet eun dra deomp hon daou : an arc'hant.
Me garje vit va lod Louvain hag ar Brabant ;
Pell zo — arabad nac'h — e c'hoantaït Sant-Pol.
Mes, ha kredi a rit viot treac'h d'ar Saozoun oll
Epdon ? Ha c'hui eo, komt, a roio douar d'in
Ma sav etre Bedford ha me, pa refuzin ?
Hag erfin, kaout arc'hant er vrezel a zo red.
Ar gounid dlefe chom gant al lemma spered,
Mes gant an alc'huez aour meur a zor a zigor ;
Ha ma kirit rei Jeann, emaoc'h pinvidik-mor.

Kalon re vad oc'h euz evithi. — Sonjit mad ! —
Mar bez red, o po c'hoaz kalz pounnerroc'h ialc'had !

(*An duk kuit*).

DIVIZ IV

IAN A LUXEMBOURG

IAN, *o sellet ouz an duk*

Pa n'hellez ket ober da labour kriz epdon,
Satan, te oar peleac'h poueza var va c'halon !
Kaout priz ar goad ! O mez ! O spount ! — Ma ne ran ket,
Gant an duk hag ar Saoz va-unan oun gwasket !..
Goas a ze ! ar goulmik vo taolet d'ar sparfel.
Va enor a gollin ?.. n'oun ket goest da herzel.
Mes trec'het gant va zech, n'oun ket fallentez oll :
Me raio vad d'eun all, ma kasan Jeann d'he c'holl.
Skanvad a rai ennon va remors, marteze !
Ar brezellour dispar, Xaintraill, a vev aze
Er prizon : ra 'z aĩ kuit, ne baeo d'in netra.

DIVIZ V

IAN A LUXEMBOURG, HE VAP

AR MAP

Ha guir eo ? Komt Beauvais zo deut ? goulén a ra
Ma vo roet dezhan Jeann ar paour, keaz Guerc'hez ?

IAN

Re vir !.. Goulén a ra... Hag an duk didruez
A lavar rei... Hen eo ar mestr...

AR MAP

Var a glevan

An duk hag hen zo mestr var oc'h enor, breman ?..
Jeann a zo deoc'h, va zad ; den na c'hell he frena ;
Beza just a rankit 'n he c'henver, ep krena.

IAN

M'hel laka tre daouarn va mestr, n'he guerzan ket.

AR MAP

Pilat a dal Judaz ! Diouallit, me ho ped !
Hano brudet hon tadou koz, hon hano-ni,
He stlabez rafac'h dre ker goas falloni ?
Nan, va zad, ne reoc'h ket. Etre an daou gostez
A zraill hag a zismantr etrezho hor bro gez,
M'hen anzav, n'eo ket eaz gouzout e pe du trei,
Gant pini 'ma ar guir. Mes re anat eo, rei
Eur plac'hik didamall d'he enebour goasa,
D'eur prenour prest d'he barn, va zad, ha d'he laza,
Eun torfed euzuz eo : dalc'hit Jeann ar Verc'hez !
En hano oc'h ene, en han' hor c'harantez,
Pellaĩt an torfed, pellaĩt ar malloz

Guezfe varnoc'h, var ho pugale, hon tud koz !
 Sonjit en ho prud vad... o pet truez ouz Jeann !
 Bep marc'hek mad e Frans, bep plac'h, oll a-unan,
 Ho ped hag oc'h asped ganen... Unan epken
 A drido he c'halon ma varv hor c'houlmik ven :
 Isabeau, ar pezh fall, mestrez an treitourien !

AN DUK, *divar an treujou*

Luxembourg a zento : me eo her gourc'hemenn !

*Ar paotr iaouank, strafillet, en em stard
 var boull kaloun he dad.*

EHAN.



TREDE ARVEST

TAOLEN VI

Barnet !..

Prizoun Rouan e tour braz ar C'hastel. A ziou, an or. A gleiz, en eur c'hough-tro, eun toul eleac'h m'ema tammik guele Jeann d'Arc. A ziou, eun daol evit an tri soudard Saoz a ziual anezhi : John Gris, John Benwoit, ha William Talbot. Er penn pella, eun treust en he zav soun gant eur jaden da staga Jeann outhan.

Pa zav ar goel, Jeann a zo gourvezet, en he guiskamant du (*cf.* Loden I, eil daolen) var he guele. Ar soudarded, o varvaillat, a zo azezet ouz an daol.

DIVIZ I

JEANNE D'ARC, AN TRI SOUDARD SAOZ

JOHN GRIS

Ia, Lahir zo paket, Lahir ker mad guechall
 Da doui evel eur pañan, da zakreal,
 Ha sorset gant hou-ma. En eun taol follentez
 E sonjaz diganeomp laerez he zorserez :
 Al louarn koz a oue gripet dindan Rouan.

(O saludi).

Ha John Gris a gemer an enor d'hen embann !

(C'hoarzin a reont).

JOHN GRIS, *o tiskuez Jeann*

Nemet en he vrac'h Jeann n'e doa ken esperans,
Hag ar plac'h zo kollet evit mad, emichans :
Rag kaer zo bet difen meur a dro, grons, outhi,
Ec'h askemer he dillad goaz : achu ganthi !

(Mont a ra da zijadenna Jeann).

Las ! sikour ebet ken, ker brao jeneralez ?
Da vignouned zo deomp, da roue da zilez !

JEANN, *o sevel divar he guele*

Va roue, klevit mad, zo eur marc'hek leal
Ha re zen a galoun 'vit euz Jeann dizonjal !

JOHN GRIS

Hennez ? ! Pa deu Lahir ama da baka lamm,
D'eur plac'h fall e lavar he garantezik-flamm.
Evidoud, mall d'an dud dont d'az kerc'hat timad,
Ar pezh 'teuz da c'hortoz... sell du-hont !

(Diskuez a ra ar prenestr digor).

JEANN, *o kila gant eur griaden a spount*

An tantad !

O poan an euzusa ! o na krisa torfet !..
O va Doue, perag o peuz va dilezet ?

DIVIZ II

Ar memes re, AR FRER MARTIN LADVENU, AN URCHER
JEAN MASSIEU

LADVENU

Morse, va merc'h, Doue na zilez he dud, nan,
Hag euz he berz d'ho konsoli e tiredan.

JEAN MASSIEU

Sad' ar skrid a rankan lenn dirazoc'h, siouaz !

(Lenn a ra ar zetans).

« Ni, Per Beauvais, ha frer Ian ar Mestr, vikel vraz
Barner Rom, ha ganthan bet lakeat da varner,
D'an oll ama salud ha peoc'h en Hor Zalver !
O veza m'eo savet enepdomp eur vaouez
— Jeann d'Arc, a lezhanver e Bro-C'hall « ar Verc'hez » —
O veza m'anzavaz he zorfejou, dre gaer ;
O veza ma touaz dilezel he gevier
Dirag ar bobl ha ni, var ar blasen vras ; mes
O veza m'eo kuezet er pec'hed a-nevez :
Dre-ze ni he diskler heretik, azkuezet,
Idolatrez Satan, hag en drouk kaledet.
Var blas ar Marc'had-koz, dirazomp e teuiou
Da veza distaget euz an Iliz, hirio,

(Disparti unan brein a zalv an oll banden).
Da justis ar Roue d'he barn, hiviziken. »

(Massetu a stou he benn, ha kuit).

JEANN, *o vouela, da Ladvenu*

Va zad, hag achu ve ganen ? va barn a reer
Ha padal na meuz great drouk ebet...

LADVENU

Hor Zalver

Ken nebeut, va merc'h paour : mes 'vidomp e varvaz.

JEANN

Ah ! ken dous hag ar mel vije bet d'in, siouaz !
Gouzanv fors pe boan all e skoaz ar maro-ma.
Perak sevel ouzin ken didruez brema
Ma 'z eo red d'am c'horf paour, am boa dalc'het ken glan,
Mont e ludu — ker iaouank all — dre nerz an tan !
Ah ! ma karjent va c'has da brizoun an Iliz
(Rag outhi va c'haloun defe pleget a-diz)
Kent eget va zeuler da voazed divezet,

(O tiskuez ar zoudarded)

En darvoud iskiz-ma ne vijen ket kuezet !

LADVENU

Jeann, sonjit ennoc'hui, pardounit d'ar re iud !

JEANN

Ia... Guelit, va Doue, barner braz an oll dud
Pet kastiz e meuz bet e gobr d'am oberou !
O Mari, mamm Jezuz, Rouanez an Envou,
O pet truez ouzin, c'hui ker mad, ken tener.
Pardounit d'in, tud keiz, 'vel ma ran e kenver
Va bourrevien digar. Ra vouezo va mamm geaz
E vo maro he merc'h pur, evel ma vevaz.
Ha brema, Tad, mar plij, an absolven.

(Kueza ra d'an daoulin).

LADVENU, *o sellet ouz an Env hag oc'h astenn he zaouarn
var Jeann*

Va merc'h,

Ho kloar a bar en Env ken skeduz hag an erc'h :
Va bennoz deoc'h, Santez hag a bed eur pec'her !

DIVIZ III

*Ar memes re, BEDFORT, KOMT BEAUVAIS,
BEAUPER, JEAN D'ESTIVET*

JEAN D'ESTIVET, *outhan he-unan*

Da ziskuez e reaz drouk, pe d'he lakâd d'ober,
Furchomp beteg ar strad e kaloun ar plac'hik.

JEANN, *o vouela en eur vont trum d'ar c'homt*

Aotrou, dreizoc'hu eo e varvan !

BEAUPER, *souezet var e veno*

Kempennik !

Mar d'oc'h kristen, soublit d'an Iliz. Rag daoust ha
D'am aliou, o nac'h ar guir feiz, perag ta
'N em viskit eun eil guech evel ar soudarded ?

JEANN

Pe viskamant benag a zouger, fors ebed :
Ne zaotr ket an ene !

D'ESTIVET

Gevier !

JEANN

Ha c'hui, d'ho tro,
Perag o peuz ama pourchaset va dizro,
Eleac'h va digemer e prizoun an Iliz !

BEAUPER

Da veva divar dour ha bara, ar frankiz
O poa bet : mes perag ho tillad goaz erfin ?

JEANN

Va lakit gant merc'hed, dillad maouez zougîn :

(*O tiskuez ar soudarded*)

Me jomfe, a gav deoc'h, 'vel eun oan d'ho pleizi ?

BEAUPER

Peoc'h d'in gant ho kaoziou ! Mall eo peurachui,
N'euz ket amzer. Eur vech diveza, respontit :
Varze petra laraz ar Moueziou a glevit ?..

JEANN

Va Zentezed am zamallaz, — dre ma klasken
Espern d'am c'horf dister eur boan hag eun anken, —
Da veza varnez koll va loden baradoz !

D'ESTIVET

Ha c'hui zo ta kannad Doue, var ho menoz ?

JEANN, *gant majeste*

Ia, Doue va digas : me rank hen diskleria.

BEAUPER

Mes e Sant-Ouan, diziou, ec'h anzavec'h fazia !

JEANN

Na meuz ket anzavet ! Semplet gant ho kourdrour,
Gant ar spount euz an tan, gant an dud hag an trouz,
Me meuz sinet, guir eo, eun tam paper benag :
Ep gouzout dare d'in na penaoz na perag...
Mes na meuz ket nac'hët va Moueziou, c'hui her goar !

BEAUPER

Mes padal ar paper ho nac'h !

JEANN

Gaou a lavar !

Barz sina kementse, mil guech vijen maro !

(Da Nicolas Loyseleur).

Penaoz o peuz kredet va zrompla ken garo,
C'hui ha Calot ar Zaoz a roudenne va c'hroaz ?

BEDFORT, *da Loyseleur hag a zav da respount*

Hastit ! Chomp a rafemp ama bete varc'hoaz
Ma rankfemp askoulen var he oll sorc'hennou !...

JEANN

Ah ! Skriva rit kement zo c'nep d'in, aotrou :
Mes ne skrivit morse ar pezh zo evidon
Hag a c'helfe noazout deoc'h, evel m'o p'euz aon.

D'ESTIVET

En deiz ma tilezec'h hag ho mamm hag ho tad
Ep ho c'hounje, ha c'hui gave deoc'h ober mad ?

JEANN

Pa mije bet kant tad ha kant mamm d'am delc'her,
N'euz fors, e vijen eat, Doue oc'h va gelver.

D'ESTIVET

Perag kuzat outho dre be hent ho pale ?

JEANN

O vreve ho c'haloun va c'haloun a fraille.

D'ESTIVET

Pec'hed ha pec'hed braz oc'h euz great er c'hiz-ze.

JEANN

Lezvarn Poitiers n'en deuz hen rebechet morse,
Hag o c'houzout edoun honest, kristenez vad,
Ennon e kredjont oll.

D'ESTIVET

Heretik oc'h, meurvad.

BEAUPER

Pe desteni o poa prometet d'ho Roue ?

JEANN

It dreist. Biken n'o po diganen ar ger-se,
Ne reoc'h ket d'in terri al le a meuz touet.

D'ESTIVET

Perak oue ho paniel er renk kenta, stouet
Dirak ho mestr, e Reims, ouz he zakri p'edor ?

JEANN

Bet er boan, dleet oa dezhi beza 'n henor !

BEAUPER

P'o peuz tec'het deuz tour Beaurevoir, livirit,
Deuz ar vuez ha c'hui na vennec'h ket mont kuit ?

JEANN

Tec'het diouz ar Zaozoun, ne vennjon ken, allas !
An evn paket en euz guir da derri he las.

BEDFORT

Da las d'id e lakeomp ar jaden ar grenva.

JEANN

Va chadenna c'hellit, gant kounnar va breva ;
Mes ne jadennoc'h ket va bro dindan ho peac'h,
Ec'h adzavo daoust ha deoc'h.

BEAUPER, *o trouc'ha berr*

Petra c'houlennac'h

Ouz ho Moueziou ?

JEANN

Tri zra : kas va labour da benn ;
Obten sikour Doue evit ar Francizien ;
Hag evidon erfin, savetei va enc.

BEAUPER

Pec'hed marvel a rit dre gement a fouge.
Kredi a rit ha bez' e maoc'h e stad a c'hras ?

LADVENU

Na spountusa goulén ! N'oc'h euz bet guir biskoaz
D'hen ober.

AR C'HOMT, *drouk ennhan*

Grit peoc'h, c'hui ! Me oar petra c'hellan.

JEANN

Ma ne d-oun ket, Doue da va lakâd ennhan ;
Ma 'z oun, Doue d'her miret d'in.

LADVENU, *outhan he-unan*

Kaera burzud !

Ar gasouni gant he zroiou flourik ha iud,
An orgouil sakrilaj, a stegn fors pe rouenv :
Bep taol a denn-askell ar goulm a nij d'an Env !

(D'ar c'homt).

Evit barn traou ar feiz diez pe kuzettoc'h
N'euz nemet ar C'honsil pe ar Pab, a ouzoc'h.

JEANN

Ar Pab ! Ah ! me laro an traou red dirazhan !

D'ESTIVET

Pell ema.

JEANN

Ha Doue ?

D'ESTIVET

Re huel he-unan !

JEANN

Mes he dro a zeuio !

AR C'HOMT

Petra fell deoc'h laret ?

JEANN

Me lavar er galoun Doue a oar gullet,
 Emaoc'h e danjer braz, Aotrou ; ha mar kirit,
 Taolit evez ouz ar varnedigez a rit !
 Dalc'hit sonj mad, ma sko breac'h an Aotrou varnoc'h.

AR C'HOMT, *o koll pasianted*

Achuomp. Gant doujans ha gant keuz, ha prest oc'h
 Da zoubla d'an Iliz ?

JEANN

A galoun, e peb giz.

Mes var galv Hor Zalver d'ar vrezel pa deuz,
 Sonjal a rit e ven laosk aoualc'h vit hen nac'h ?

BEAUPER

Mes ma vel an Iliz eo gaou a leverac'h,
 Ha ne c'hell ket tenna diouzac'h ar virionez ?

JEANN

An Iliz... ha c'hui eo ? Doue va anavez :
 R'am barno var an traou a c'hourc'hemennaz d'in !

D'ESTIVET

Hou-ma d'he fals lavar a zalc'h betek ar fin.

BEDFORT, *da Jeann*

Merc'h Satan, lavar deomp, profetez fall ma 'z oud,
 Hag ar Zaozoun a dle kuez a 'n eur goal zarvoud ?

JEANN, *varnhi sklerijen an Envou*

Araok seiz bloaz, e vo skubet ho marc'heien
 Ha Doue a roio an treac'h d'ar Francizien.

D'ESTIVET

Penaoz her gouezez, te ?

JEANN

Dre lavar an Aotrou !

AR C'HOMT, *drouk braz ennhan*

Ia, an ifern a c'huez he lorc'h en he c'homzou,
Ar burzud-se n'eo ket euz an Env, a douan.

JEANN, *gant nerz*

Ar Zaozoun a dec'ho, ne jomo ket unan :
M'hen toufe, ker sur oun ! M'her goar ken difazi
Ha m'ho kuelan !

D'ESTIVET

Dreze, na dizit nac'h hini
Euz ho komzou, hini euz oc'h oll oberiou ;
Embann a rit ar Zent a ro deoc'h aliou ?
Mes anaout a rit mad, larit, peger kriz eo
Ar zetans ?

JEANN, *krenvoc'h-krenva*

An oll ! Mes pa dlefe ar bourreo
En tourmanchou kas kuit euz va c'horf va ene
— Fardet an tantez d'in, an tan krog ennon-me —
Ne laosken ket eur ger, nemet henvel bepred :
Ha beteg er maro !

AR C'HOMT, *drouk-ruz ennhan*

Peoc'h d'in ! Brema, me gred,

Nemet ho parn dioc'htu ne jom ken da ober.
(*Oc'h he diskuez d'ar soudarded*).

Kasit-hi, soudarded.

(*D'ar bourreo*)

Ha te, gra da vicher !

JEANN, *o kuez d'an daoulin*.

O Jezuz, pa ieaz ho kuerc'hez d'ar vrezel,
He breac'h n'e doa ken nerz nemet en ho skoazel ;
He labouriou, ... dre ho kalloud e ouent great oll ;
Senti ouzoc'h, Jezuz, ne reaz ken : d'he digoll,
Lakit he ene feaz 'n ho Paradoz santel,
Ha grit d'ar Fransizien, desket gant he c'hentel,
Krenfeat gant he skueriou, — paouez d'al lazerez
Ha restaol d'ho Roue, buan, ar Frans abez !
Da va oll bourrevien me bardoun ho c'hrizder,
O pignat d'an tantez evel ouz eun aoter !

(*Adsevel a ra hag e kerz da heul ar soudarded gant
d'Estivet ha Martin Ladvenu*).

DIVIZ IV

AR C'HOMT, BEDFORT

AR C'HOMT

Mantruz eo he guele, pegen seder ha sioul,
Ken divlam hag eun eal, ijinuz 'vel an diaoul !
M'hen anzav, eo ganthi nec'het oll va spered.

BEDFORT, *rok*

Maro hounnez, klevit, zo vidomp eun dra red :
 Ha kas kuit a rankomp peb truez didalvez.
 Pa ziskuezimp ez eo d'an diaoul servicherez,
 An dud — dallet pa oue Charles sakret dreizhi —
 A droi kein o koumans, dre spount, da ziskredi.
 Charles a c'houlén Jeann ; pedi, gourdrouz a ra :
 Mad ! kas he Jeann d'an tan vo hor respount kaera !
 Ha pa vezo-hi stag ouz ar peul er flammou,
 Ra zeui da stourm, ma kar, evit freuza 'r c'houlmou !

AR C'HOMT

Ia. Mes epdomp, aotrou, panefe hon taol skoaz
 Oc'h he barn ken difre, ne vijec'h ket treac'h c'hoaz !

BEDFORT

Guir eo... Na meuz ket c'hoant da nac'h ho kopr ouzoc'h.

AR C'HOMT

Pemzek vloaz meuz poaniet, a zeiz da zeiz startoc'h.
 Abaoue m'ouen galvet gant Ian an duk Dizaon,
 Ne gavfot 'n ho labour den, ken leal kompagnon,
 Da gounnar va c'heariz 'talc'hiz penn en ho tu :
 Ha me, komt, oue bannet er meaz evidoc'h !
 Hag ar varn-ma, pouezit pet stourmad ha pet poan,
 Pet enkreiz e koust d'in, deiz ha noz, ep ehan :

Fardet var va ali, renet ganen, aotrou,
 Me rank he c'has da benn o tiouer an testou,
 O koms hag oc'h ober enep tud touellet,
 Va-unanik erfin treac'h d'ar plac'h tamallet.
 Ha na meuz ket, eleal, roet ho c'hoant deoc'hui ?
 Mes a hent-all, aotrou, sonjit pe gasouni
 Bilimuz a dennan varnon, da virviken,
 Pa roan ken spountuz lamm d'oc'h enebourien.
 Keit all a labour vad — livirit oc'h-unan —
 Ha ne dal ket ma ven digollet mad breman ?

BEDFORT, *evel ep he zonzal*

Hag e vezoc'h.

AR C'HOMT

Mes peur ?

BEDFORT

Aotrou, n'ouzon dare.

AR C'HOMT

P'hellit ober dioc'htu, perag chom da zale ?

Ehan.

Ma c'heller, chench an taolennou a vel d'an oll.



TREDE ARVEST

TAOLEN VII

Ar Verzerez

E Rouan, var blasen ar Marc'had-Koz, 30 Mae 1431.

Ar varnerien a zo var eur chaffod, dirag eur bern keuneud
huel savet gant ar vourrevien.
Tud dreist-kount o sellet.

DIVIZ I

BARNERIEN, SOUDARDET SAOZ, GOAZED HA BUGALE

EUR ZOUDARD SAOZ

Ha ! mall braz oa ! O vont d'he leski emaer ta,
Ar plac'hik a rede d'Orleans d'hor bunta !

EUR ZOUDARD ALL

'Vit touelli ar bobl, houn-nez hag a doue
Dont da zalvi an oll dud all en han' Doue,
R'en em zalvo ar genta, ta !

EUN TREDE

Pe a hent all,

Doue c'helfe ober eur burzud d'he diouall.
Ha m'o deuz Sentezed joa ouz ar sorserez,
Arabad d'ho galloud dale d'en em ziskuez !

EUR GOAZ, a douez ar bobl

Flemmit-hi, tud divez ! C'hoarzit, Saozoun daonet !

EUN ALL

Nan, ar fougerien-ma n'oant ket ken entanet
Pa bakenet lamm var lamm, ganthi treac'het bemdez !

EUN TREDE

Guelet devi eur plac'h, dezho ro levenez.
Hag ho c'hasouni iud a verv kriz, seul grisoc'h
Ma voue he c'haloun vad outho truezusoc'h.

AR C'HENTA

Ar roue, bet dreizhi kurunen ha peb tra,
Ha ne finvo morse o klask he dilivra ?

AN EIL

Hag ar marc'heien oll a rede da heul Jeann
O c'hoapâd ar maro... eat peleac'h ? ne reont van ?
Hag hini, manket taol Lahir, n'hello laerez
Digant he bourrevien aounik ar verzerez ?
Pe, vit an den ma vez al labour re bounner,
Mervel e tal an tan, he gleze soun en er ?

EUN ALL

E tal an tantez-ma !.. Nag euzusa kalvar !

EUN ALL

Klev ! ar Zaozoun a iud var he lerc'h ho c'hounnar !

EUR ZOUDARD SAOZ

D'an tan, ar plac'h fall !

EUR C'HROUADUR

Ah ! me varv, ken spountet oun !

DIVIZ II

*Ar memes re, JEANN D'ARC, FRER MARTIN LADVENU,
MASSIEU, SOUDARDED, etc.*

JEANN

En han' Doue, tud ker, grit pedi evidoun !..
Rouan, Rouan, daoust hag ama ta e varvin ?..
Evidot e meuz aon euz ar walen divin !..

LOYSELEUR, *o krial*

O Jeann, ho pardoun d'in ar pec'her, ho pourreo,
Gant broudou va ene, siouaz, krignet ez-veo !
P'en em fiziec'h ennon, paet oan d'ho spia !

EUR ZOUDARD SAOZ

Kerzit ac'hann, m'oc'h euz ho mez da ziskleria !

LOYSELEUR

Va list ! Dirag an oll 'n em damall zo red d'in !

JEANN

Ho pardouni a ran.

EUR PAOTR

O karantez divin !
Pardouni ra zoken d'he bourrevien !

EUN ALL

Ha ni

Tud dic'halloud ma 'z omp, daoulinomp da bedi :
Pedi 'vit Jeann a vo tamall he barnerien.

AR SOUDARDED, *o skei a ziou hag a gleiz*

Alo, peoc'h eta, c'hui ! Grit plas !

EUR GOAZ, *o sevel he zourn outho*

Ouen bourrevien !
Hi hor venjo 'n eur ho punta deuz hon harzou !

EUR ZOUDARD, *o c'hoarzin goap en eur ziskuez an tan*

A gav d'id ? deuz varc'hoaz da glask he relegou !

AR GOAZ

Ro peoc'h, saoz milliget ! Lonk da vlasfem en dro
Pe dioual oc'h Doue !

BEAUPER

Jeann, e pred ar maro,
Grit ho peden, m'oc'h euz truez ouzoc'h.

JEANN

Siouaz !

Treinded santel, o pet truez ouz ho merc'h keaz...

Kredi a ran ennoc'h ; m'ho kar bete 'r maro !

Santez Mari, va zikourit em stad garo !

Deut d'am rekour, sant Mikeal, sant Gabriel,

Ha c'hui va Zentezed, Mac'harit ha Katell...

Belcien, livirit an offeren ydon...

C'hui oll, pardounit d'in : d'an oll me a bardon.

Arabad eo tamall Charles va guir Roue :

Ma meuz great fall, hen zo disklabez... Va Doue,

D'am dioual, d'am zikour ! Oll Sent ha Sentezed,

Sikourit ho c'hoar Jeann 'n he zremenvan, m'ho ped !

*(Pignat a ra var ar chaffod
gant frer Martin).*

EUR ZOUDARD

Ha ni leino aman ? Difre, ma 'z aimp ac'hann !

JEANN

En han' Doue, tud vad, eur groaz d'in.

EUR ZAOZ

Dioc'htu, Jeann.

JEANN

Ne d-oun na schismatik, nag heretik, an oll ;

Mes kristenez vad oun !.. An tan ! pebez horrol !

Guel ve ganen beza bet dibennet seiz guech.

D'he barnerien :

Dirag Doue, d'ho tro, c'hui glevo va rebech.

*(Eur groaz a zigaser dezhi. Jeann a bok dezhi
hag he laka en he c'herc'hen).*

D'ar zaos :

Doue r'ho tigollo !..

D'ar frer Isambart.

Tad, me garfe kaout c'hoaz

Ar grusifi... guelelet va Jezuz var he groaz !

P'hen deuz bet ker braz poan, he zonj va rekouro.

FRER ISAMBERT

D'an iliz e zan.

KOMT BEAUVAIS, o tostâd deuz an tantes

Jeann, ken tost ouz ar maro,
 Vit ar vech diveza respontit : ha breman
 Ne zislavarit tra ?

JEANN

Tra ! — Dreizoc'h e varvan.

*(Frer Isambart a deu gant krusifi an iliz hag he ro
 da Jeann da bokat. Ar flammou a zav).*

JEANN, da Isambart

Mestr, diouallit, an tan !.. Diskennit. Mes dalc'hit
 Ar goaz huel, ha gant ho komz va c'hennerzit.

*(Trouz ebet epad eur momedik. Erfin, e klever an Elez
 o vuzkana a-uz d'an tan evel er Baradoz : Veni,
 sponsa Christi, etc.)*

JEANN, krenv

Va Moueziou n'o deuz ket va desevel, nan, nan !
 Deuz an Env e teuent ! En heur va zremenvan,

Me lavar ne meuz great 'met senti ouz Doue
 Hed va buez ! — Jezuz, resevit va ene !
 Va Frans karet, kenavezo... Jezuz !... Mari !...

*Ar boblad tud a red kuit spountet.
 Ar varnerien a deu var an araok, sebezet :*

LADVENU

Kollet omp !.. Eur zantez, Eal hor mam-bro 'z oa-hi !

DIVEZ

